

Berthou. (Alc'houeder Treger) Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

Lemenig, skwer ar varzed, bet embannet e 1914.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez gand ereadurez ar galleg. Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Isikiz eo ar skrid-se. Drezañ e wele petra a zoñje tud 'zo, ar re a zivenne ar brezoneg, en amzer-ze. Huñvreal a reent. Red eo lavared ne oant ket toud deuz ar mod-se, evuruzamant.

Al levr-mañ
a zo bet moulllet dioutañ
kant hanter-kant niverenn
ha n'int ket bet lakeet er henwerz

Taolenn

AR HORV

Paourentez

Ar stourm kenta

Buhez nevez

AR GALON

Lemenig ha Breiz-Izel

Mestroniez Lemenig anzavet gand tud ha loened

Priadelez gand Breiz

Lemenig hag ar broiou keltieg

AR SPERED

Breiz-Veur ha Bro-Hall

Skwer buhez Lemenig

Lemenig ha gouiziegez ar bed

Maro Lemenig

Kan-bale soudarded Lemenig

Teirnez Breiz.

Ragskrid

*Sevenet an diouganou :
Levenez 'leiz ar halonou.*

*Hag an Aouenn Veur o c'hweza
War Spered Breiz o tistriza.*

*War an Daolvên eo greet al Le
An eur a zono hepdale.*

*Erru Lemenig gwenn-varo,
Lemenig an Troher garo.*

*Dond a raio 'vel tarz-an-deiz,
Ha war e lerh e kerzo Breiz.*

*Ema war ribl ster an Elorn,
Kleze Arzur lufruz 'n e zorn.*

*E vleo loued, mez 'n e galon,
E verv gand kadarn eul leon.*

*E armeou a yelo pell,
Pelloh 'vid bevenn Breiz-Izel.*

*Stourmi outañ den n'hen gallo,
Na saoz, na roman, na Gallo.*

*Erru ! Dasorher or Frankiz,
Lemenig, levenez Breiziz.*

I

Ar Horv

Sevel a raio harnezet
War e wele a varo.
Mond a raio da lemma
E zent ouz dero Bro-Hall

An diouganer

I

PAOURENTEZ

War VARLENN E VAMM BREIZ

Lemenig a hanas e Rostren, an 10 a viz mae 1855, da zeg eur mintin. Koef an eurvad a oa war e benn ha poueza a ree deg lur, pouez talvouduz evid eur hrouadur-den o tond war an

douar. Hogen ezomm braz en-devoa da gaoud nerz evid beza gouest da veva eur yaouankiz ken kriz hag an hini en-deus bet.

E dad, Guillerm ar Fusteg, a oa hucher ; addimezet e oa evid an eil gwech : e deirved gwreg e oa Katrin ar Braz.

Bez' en-devoa daou vugel euz e wreg kenta, eur verh hag eur mab. Hemañ a oa bet beleg ha marvet e oa bet person e parrez Plouleh.

Katrin ar Barz a roas da Willerm ar Fusteg pemp pe hweh bugel :Lemenig a oa unan aneze. Roet e oe dezañ an ano a Yann.

Tud ar Fusteg a oa euz ar Stang-Nevez, etre Plijidi, Sant-Konan ha Sant-Jili-Plijo.

Tud ar Barz a oa euz ar Brugou, e parrez Graz, e-kichenn Gwengamp.

Goude ganedigez Lemenig, ar baourentez en em stagas bemdez mui-ouz-mui ouz tiegez e dud, hag a gendalhas ken n'erruas gand ar re-mañ gouzañv an dua ezomm.

Lemenig a oe kaset d'ar skol adaleg e genta bloaveziou. Raktal ma oe lakeet war ar bankou, e tiskouezas eur spered dreist da hini ar vugaligou all. Goude beza tremenet daou vloaz hanter e ti an itron Bourhig, e oe kaset da di frerien Kompostal. Oajet e oa a bemp bloaz. Eno, e-pad pevar bloaz, den n'hallas hen staga ouz ar skol. Petore nerz a vounte anezañ da bellaad diouz ar studi ? N'eus forz ! Pez a zo gwir ez eo ne gave peoh ebed en e galon a vugel, na levenez ebed, nemed pa helle mond da redeg ar mêziou, koulz e-pad ar goañv hag e-pad an hañv.

Eñ e-unan e-neus kontet d'e vignoned pegen laouen e veze, eur wech distroet diwar hent ar skol, o redeg dre ar parkou goloet gand erh ha skorn ; pegen kaer e kave ar hoajou, gwennet gand ar reo, ha pegement a blijadur a gemere o c'hoari war ar steriou skornet.

« Va mamm Breiz, emezañ, a ziwalle ahanon. Ar vro a oa leun a vleizi hag a voh-gouez : bemdez e kleved ar bleizi-mañ oh harzal spontuz en-dro da gêrig Rostren, war ar meneziou, ha den ne grede chom er-mêz goude an abardaez. Aliez e veze klevet komz a walleuriou c'hoarvezet diwar al loened gouez ; ahanta, al loened gouez a zistroe dalhmad diwar va hent : biskoaz n'em-eus bet da hoari gante. »

E-pad an hañv, hevele buhez digabestr : redeg dre ar parkou, pa veze gwisket ken kaer e vamm Breiz gand saeiou alaouret ar meneziou ha gand glazur bleuniet an traoniennou ; pa gane ken flour an evned er gwez, dindan bannou an heol ; mond da neuial bemdez, du-mañ, pe du-ze. Ne ree netra ouspenn. Bepred e tremenas diwallet rag an naered ha rag an oll loened fall, daoust dezañ beza bet aliez en leh da veza gwallet.

Katell Goelo

D'ar houlz-mañ, hag aliez goude, Lemenig a gave war e hent eur wrah koz daoubleget, anvet Katell Goelo, a oa o chom en eul lochig e-barz eur ru vihan a zav a dachenn gaer da gribenn ar hra.

Katell, eun devez, en em gavas eta war hent ar bugel, ha hi da hervel anezañ :

« Deus amañ, paotr bihan, ma welin da blanedenn ez penn. »

Lemenig a zentas, ha Katell goz en em lakaas da ziluzia e vleio gand he bizied ha da niveri :

« Unan, diou, teir... O ! beza a zo c'hoaz ! peder, pemp, c'hweh... Ola avad ! Setu amañ eur penn evel na vez ket gwelet nemeur ! Seiz !... Ahanta, paotrig, pinvidig e vezi. Eiz ! Nao !... Ya, nao rozenn ez penn. Va feiz 'ta ! Biskoaz kemend-all n'am-bo gwelet. Nao rozenn ! Va Doue ! Petra a zegouezo diouzit ? Te a vezo eskob d'an nebeuta ! »

Ha konta a ree c'hoaz, hag adkonta, gand aon rag beza faziet. Ha nao rozenn a gave bepred. Daoulagad ar baourez kêz a hoarze d'ar gavadenn. Hag abaoe, ken liez gwech ma kave Lemenig war he hent, e tiluzie e vleio evid gweloud ar burzud-se : nao rozenn en eur pennad bleo hepken ! Ha derhel a ree gand he flanedenn :

« Eskob ! te a vezo eskob, va mabig ker. O ! ya, d'an nebeuta ! »

Lemenig a dremene neuz e amzer vad war an douar, war galon e vamm Breiz.

Pa zegouezas gantañ kaoud noa bloaz ha daou viz, e dad a guitaas Rostren evid mond da chom da Wengamp, o kredi kaoud eno gwelloc'h difenn 'eneb ar baourentez.

Lemenig skolaer

Eun tammig harp a zeuas d'e dud dre eur henwerz savet gante.

Lemenig a oe kaset adarrez da skol ar frerien. Mond a reas, evel eun divroed, da azeza war ar bankou nevez. Eur bloavez a dristidigez a dremenas eno, siwaz ! Echu 'oa amzer ar blijadur, amzer ar redadennoù war ar mêz.

Ar bloaz war-lerh e oe kaset d'ar skolach. An dro-mañ e troas penn d'ar vaz : daoust dezañ beza tremenet e vugaleach kenta heb labourad war ar studi, heb beza desket netra, daoust d'an oll kredi, en-dro dezañ, e oa o vond da goll e amzer hag arhant e dud, er skol, azaleg an deiziou kenta, Lemenig a grogas ken stard ha ken kaloneg gand al labour, ken e savas d'ar henta renk. Abaoe e-neus miret ar renk-se keit ha ma ez eo bet er skolach, da lavaroud eo, azaleg miz here 1865 betek ar 25 a viz mae 1872.

Eno e spered a gavas da hoari ! hag e gorf kemend-all ! Al latin nag ar gregach ne blijent ket dezañ nemeur, ha war ar galleg e oa klouar ivez. Ar studi a roe dezañ ar muia a levez e oa hini ar saozneg, rag o teski ar yez-mañ e kleve kelou a Vreiz-Veur, mamm-goz ar Vretoned. Eur wech krog er studi-mañ, ne ziskrogas diouti, na noz, na deiz, ken ma oe barreg da lenn, en o hed, oberou ar barz Shakespeare.

« Rag, emezañ, me a zeblante din, pa lennen c'hoariellou ar skrivagnour-mañ, gweloud an traou o tremen war zouar Breiz-Izel ha klevoud moueziou anavezet mad o komz. Hag abaoe e klevan aneze bepred. Breiz-Veur a halv ahanon gand eur vouez ken karantez hag hini va mamm Breiz-Izel. Siwaz ! harzet ez on bet, e-pad pell amzer, da vond da weloud ar Vamm-Enezenn. »

P'errue an eur da vond da hoari, Lemenig a veze c'hoaz er penn kenta, dreist-oll pa zave kann etre eur bagad skolaerien, ha kement-mañ a hoarveze aliez a-walh. Lemenig a veze pedet neuze da gemer penn eur gostezenn, an hini an disterra, beb gwech. Pa veze red stourm, ne zelle nag a-dreñv, nag a-gostez : kemer a ree penn ar stourmerien ha rei a ree kalon, war e lerh, d'ar re a grene. Biskoaz n'en em gavas e strollad a oe trehet. Eur wech hepken Lemenig a oe trehet ha gand eur mestr-studi an hini e oe.

Eun devez ma oa o konta kement-mañ d'e vignoned, a-raog kuitaad ar skolach, unan aneze a lavaras :

« N'ez eo ket souezuz. Beza 'oa eun emgleo etre da enebourien : difennet e oa tizoud ahanout. »

Lemenig war e wele a varo

Hogen deut e oa e yehed da veza fall. Al labour, ar baourentez, a boueze mui-ouz-mui war e dud, a lemme e nerz digantañ. Tamm-ha-tamm ez eas war fallaad ken e kouezas klañv fall e deiziou kenta mezeven 1871. Ar vreh gwaduz, lazet ganti kemend a Vretoned abaoe eiz miz, a oa krog ennañ. E-pad tri devez e wad a redas distank. E vamm hag ar mezeg a oa en-dro dezañ, noz ha deiz, o hedal ar houlz mad da harz ouz ar red-gwad. Med ar houlz-se n'errue ket ha setu ar mezeg, goude tri devez ha goude kemend a wad kollet, o lavaroud d'ar vamm, distroet diwar gwele ar hlañvour :

« Itron gaer, setu erru eur an diwez : den ebed, war an douar, n'hallfe harz ar paotr yaouank-mañ da vervel. Red eo din tehel, rag roet em-eus va oll skiant-prena. »

Kalon ar vamm a oe rannet. Trugarekaad a reas, koulskoude, ar mezeg kaloneg ha madelezuz, hag e tiskennas gantañ euz ar gambr 'leh ma vanas Lemenig 'n e-unan war e wele a varo.

Eur penandig goude, eet ar mezeg e-kuit, mamm Lemenig, ankeniet braz, a bignas er gambr ha kerkent e chomas estlammet, dilonstret he daoulagad en he fenn, ha ne oa ket gand ar spont an hini e oa.

« Petra 'zo c'hoarvezet ganit, va mabig ker, keit ha ma oan en traoñ ? »

« Netra ebed, mamm. »

« Ne ziwadez ken, va bugel ! » a grie ar vamm o tostaad d'ar gwele. « Va mabig, setu-te er-mêz a boan. Doue, ra vezo meulet ! »

« Abaoe ma'z oh pellaet gand ar mezeg, eme Lemenig, ar gwad a zo paouezet da vera. »

Gand petore galloud e oa bet sikouret pa oa distroet dioutañ galloud an den gouizieg, pa ne oa en galloud den ebed dond d'hen yac'haad ?

Azaleg ar beure-mañ, Lemenig e-neus sevenet lod euz an diougan koz : *Sevel a raio harnezet war e wele a varo*, rag e gwionez, eur miz goude, e save, yah groñs, diwar e wele, harnezet a gorr hag a spered, evid mond da stourm 'eneb ar bed e Breiz, e Bro-Hall, ha leh all. Roet e oa dezañ, koulz lared, eun eil ginivelez, hag abaoe en-deus stourmet, heb ehan, ouz ar bed, heb senti, heb koll nag e nerz nag e skiant.

II

Ar stourm kenta

War honid e vara

Unneg miz goude e tehas a Wengamp evid mond da vestr-studi da skolach Dinan. Oajet e oa a 17 vloaz. E studi ne oa ket peurechuet, rag ouspenn eur bloavez skol en-devoa c'hoaz d'ober ; med ken kriz e oa ar baourentez e ti e dud, ken e rankas mond da honid e vara evid dizamma eun tammig an tad hag ra vamm o-devoa savet anezañ gand kemend a evez.

Setu-eñ, e-kreiz bugale da rena. Degemer mad a oe greet dezañ gand ar re a oa dindan e veli. Bretoned e oant oll, Bretoned gall, nemed unan hepken hag a oa eur hrennard a Vreiz-Veur, kempennet mad e izili hag eñ kaloneg euz ar gwella.

Hemañ a ziskouezas kalz a garantez d'e vestr nevez azaleg an devez kenta. Hogen e-kichenn ar re-mañ e oa c'hoaz eul lodenn dindan renadurez eur mestr all. Ar re-ze a oa paotred etre pevarzeg ha seiteg vloaz ha dre ma oa ar mestr nevez demdost ken yaouank hag int, setu e fellas gante goapaad anezañ.

Lemenig, da genta, ne reas van ebed dioute. Hogen eun nozvez, da eiz eur, eun tregont kanfard bennag en em vodas dirazañ, ha int da huchal :

« Kasit anezañ en-dro ! »

Hag e reont van da zond da skei warnañ. Lemenig, heb dalei, a gerzas warne, hag e zaouarn serret, en em laklaas en o hreiz :

« Gouest on, emezañ. Kasit ahanon en-dro bremañ. »

An darn-vuia euz ar skolêrien-mañ a oa a Zant-Malo pe euz an dro, mibien ofiserien-vor, oll kempennet mad ha kreñv, hag en o mesk e oa daou baotr yaouank a Vreiz-Veur. Ar stourm a helle beza stard evid Lemenig.

« Ahanta, emezañ c'hoaz, barreg oh ? Hag aon ho-pefe ? »

Ger ebed. Daou baotr yaouank Breiz-Veur en em zistagas diouz ar re all ha tamm-ha-tamm ar strolladou a bellaas. An treh a oa chomet gand Lemenig bihan. Ha koulskoude mestr ar baotred-mañ a oa tehet pa 'n-devoa klevet ar youhadenn genta, rag ar bloaz a-raog eur mestr all a oa bet gwall-skoet gand e skolêrien hag aon a oa kroget en e galon.

An deiz war-lerh, d'ar beure, Breizad bihan Breiz-Veur a erruas er skol evel bemdez, med hirie e touge etre e zivreh brasa beh bleun lili a helle derhel.

« Eun nebeud bleuniou a zegasan deoh a liorz va mamm, eme ar hrennard, me ho ped d'o degemer. »

« O ! eme Lemenig, bleun roueleg ez eo ar re-ze. Ne zegemerin ket anezo. »

« Koulskoude, hervez pezh ez on o paouez klevoud, roue a-walh ez oh, eme ar paotrig. Hogen taolit aneze ma ne blijont ket deoh. »

Ha beb beure goude, Lemenig a wele Breizad yaouank Breiz-Veur o tegas dezañ eur vriad lili.

Eun nebeud miziou goude ez eas da vestr-studi da Roazon ha diwezatoh d'an Oriant ha d'an diwez da Boñdi. Ha labour vad a reas bepred en despet da bennou tomm ar skolêrien a glaske stourm outañ evel ma reent ouz ar mestrou all a-raog. An treh a chome gantañ koulskoude, e peb leh hag e peb bro.

Hogen Lemenig n'halle ket chom stag ouz eur skolach e tu-hont da dri pe bevar miz, rag eur c'hoant poazuz en-devoa da vale Bro-Hall ha dreist-oll da weloud Pariz. Trei ha distrei a ree evel eul loen staget. E Poñdi dreist-oll, e krogas ennañ eur glahar ken kriz ken e kollas ar housk. Eur gounnar divent a zavas en e galon 'eneb d'an oll en-dro dezañ ha, zoken, 'eneb d'e vamm hag 'eneb da Vreiz. E spered a oa evel skuiz ha skarzset ; med derhel a ree bepred gand e labour en eur enebi ouz e hoant da vond da Bariz.

Allaz ! eun deiz bennag, Lemenig a bakas e dammou dillad hag a gemeras an hent-houarn¹ evid Pariz en eru grial ennañ e-unan :

N'eus forz petra a hoarvezo,

Pez a dle beza a vezo.

Stourmou ha paourentez bepred

Setu tro an dienez hag ar baourentez ruz, koulskoude e spered hag e galon a gavas raktal peoh ha levenez.

Meur a wech, abaoe, ez eus deut soñj dezañ e oa bet kinniget dezañ, e Bro-Hall, stadou euz ar re wella, hag en-devoa nahet o degemer dre hoant da chom e Breiz. Erru 'oa an eur da baea e garantez-vro.

Gwall-skañv e oa e yalh. E dud a oa bremañ ken paour ken n'halle goulenn skoazell ebed ken digante, ha pa 'n-dije bet c'hoant d'hen ober.

Anavezodu a ree e Pariz daou zen a stad izel, hogen re uhel e oa e spered evid mond da zisklêria deze e boan. Bez' en-devoa eur hefiad dillad : ahanta, gwerza a raje kef ha dillad mar he gavje netra well d'ober.

Seblantoud a reas dezañ ez anaveze ar Gêr-Veur a-viskoaz, tud ha tier. Ha setu-eñ da redeg evid 'n em ginnig euz an eil skol d'eben.

« N'hallan ket kemer ahanoh », a veze respontet e pep tu.

War-benn eun nebeud deiziou, setu deut e yalh da veza ken kleuz, ken ne grede ken prena bara. Azaleg neuze e vagadurez a oe dour feunteun. Pa n'halle ken paea e gambr, e rankas tremen an nozveziou war vale dre Bariz. Mad 'oa kaoud diouharr kreñv. Tremen a reas eil hanter miz mae o vale heb ehan ; an darn-vuia euz e brejou a oe skudelladouigou dour. Med, pezh a oa souezuz, e spered a oa en peoh, hag e galon 'oa en he flomm ! 'Zo kaerroh, pa zoñje en e stad tremenet e Breiz-Izel, e kave gwelloc'h e stad nevez. Ne zoñje tamm en e dud, nag en den all ; degemer mad a ree d'e baourentez heb goulenn digantañ e-unan penaoz harz outi na penaoz e teuje d'he huitaad. Laouen ne oa ket, med en peoh e oa da vihanna.

¹ hag a gemeras an hent-houarn : galleg. hag ez eas gand an treñ

Penaoz n'eo ket marvet gand an naon hag ar skuizder ? Den n'hen goar. Red mad e oe dezañ, e gwirionez, beza bet harnezet, rag eun teir zizun bennag e chomas war vale, bevet gand dour, nemed pa zegoueze gantañ kavoud eur henvroad a Wengamp war e hent hag a ranne gantañ lodenn euz e bred.

Brevet gand ar skuizder, draillet e votou, louz e zillad, ne zeblante ket beza gouest da gaoud eur stad. Ne chome gantañ nemed eun esper : beza skoazellet gand ar galloud kuzet en-devoa roet sikour dezañ war e wele a varo.

Hogen, d'an oad-se, Lemenig a oa pell dioutañ soñjal en diouganou Marzin pe en diouganou all. An ano a Lemenig, dibabet gantañ kalz diwezatoh, ne oa ket, zoken, en e spered. Ne oueze netra diwar-benn ar galloudou a zo 'uz dim, hag a gase anezañ en-dro heb gouzoud dezañ.

Eur beurevez bennag, koulskoude, e c'hoantaas mond d'ober eun dro da di eur hlasker plasou. Menel a reas batet : bez' e oa eul leh evitañ en eun ti-skol 'leh ma kelenned bugale hanter-diod. An eurvad-mañ a zegouezas gantañ e deziou kenta miz mezeven. Setu-eñ da redeg ! Raktal ma oe dirag mestr braz ar skol, e oe degemeret, daoust d'e stumm a baourentez ruz. Ne chomas ket pell eno, 'mesk ar vugale baour-mañ hag o mistri, kaer en-devoa beza kroget mad gand e labour adarre, mestr war e runkun ha gouest d'ober gand an oll hervez ar gwella ; med ne oa ket ezomm dioutañ pelloh.

Ha setu red, goude eur miz hepken, mond adarre da gaoud ar feunteuniou ha da gregi gand ar baleadennou, rag nebeud a arhant a oa bet da rei dezañ pa guitaas ar skol ha kavoud eur stad all, e miz gouere, a oa er-mêz a gont.

Teir zizun bennag e chomas adarre da frita mizer gand paourentez. Er mare-mañ 'oa miret dezañ anavezoud pez a oa bet pellaet dioutañ bete vremañ.

N'ez eus ken da ziskenn

Eun nozvez, war-dro hanternoz, en em gavas da zihuni, dindan pao eur gward-kêr, war bazennou c'hoariva an Ambigu. Penaoz e oa erruet eno ? Penaoz e oa kroget ar housked ennañ ? N'en-devoa koun ebed ken. Ar gward ne roas ket amzer dezañ da galsk :

« Heullit ahanon », emezañ.

Ha setu ar paotr yaouank o kerzed a-dreñv ar gward, skuisoh eged biskoaz, hag o soñjal, a-hed ar ruiou :

« Me a grede n'hallen ken anavezoud brasoh poaniou. Allaz ! setu-me etre daouarn ar polis. Gwasa mez a hortoz ahanon bremañ ! Petra 'hoarvezo ahanon ? »

Ar gward a zigoras dor ar homiser ha Lemenig en em gavas dirag an den-mañ, red dezañ displega doareou e vuhez.

« N'hoh-eus lojeiz ebed e Pariz ? », eme ar homiser.

« O ! salokras !, eme Lemenig, bez'am-eus. An aotrou Hen-ha-hen a lavaro deoh am-eus eur gwele en e di. »

« Gwelet e vezo. Da hortoz, c'hwi a dremeno an nozvez amañ. »

Ha setu Lomenig bountet en eun toull du 'leh ma oa eun nebeud paotred dastumet eveltañ gand ar gwardou. Henez a oa eun toull a boan hag a vez, rag eno ne oa ket hepken peorien : bez' e oa ivez laeron, muntreien, ha falla tud a zo war an douar. E gwirionez, ne oa ket brao beza mesket gante. Peadra a oa da goll ar skiant.

Degouezet e oa dezañ gweloud an dud-mañ e-pad e valeadennou noz a-hed ar ster, pe er hohu braz pe 'n eul leh all bennag, 'leh ma 'n em denne an oll valeerien hep ti eveltañ, da gousked eun dakenn. Hogen mar hellfe heull e hent neuze, setu bremañ e oa staget oute. Anavezoud a reas eno krisa anken a hall gouzañv an den fur.

C'hoarzet en-deus abaoe o soñjal en e walleuriou, med ne hoarzas ket en noz-se. Koulskoude ne gollas ket e skiant. E galon dalhmad a zo savet uhelloc'h eged ar boan.

P'erruas ar houlz da veza didoullet ha da veza kaset dirag ar homiser adarre, ne oa anken ebed ken en e spered, ha ne oa ket a leh da gaoud anken e gwirionez.

« Galloud a rit tehed, eme ar homiser. Gouzoud a ran ez eo gwir ho toareou. Med diwallit mad da 'n em ankouaoud eur wech all da gousked er ruiou, rag startoh e vefeh klozet, kredit ahanon. »

Neuze e tehas Lemenig a-zindan krabanou ar gwardou, o soñjal 'oa bet trugarezuz a-walh an aotrou X... o tremen heb hen dislavaroud, rag ne oa bet biskoaz gwele evid Lemenig e ti an aotrou-mañ.

« O ! bremañ, eme Lemenig outañ e-unan, daoust hag erru ez on e penn va hent a dristidigez ? Setu gouzañvet ganin ar brasa poaniou. Marteze e tegouezo bremañ eun draig bennag a vad. »

Ne felle ket dezañ bepred goulenn skoazell na digand e dud, re baour evid galloud ober eun netra evitañ, na digand den all, ha setu-eñ krog da vale adarre, noz-deiz, dre Bariz, heb esper ebed da halloud terri e naon na da halloud diskuiza e gorv.

Eun devez ma oa, evel bemdez, o vond dirazañ, en em gavas, fri-ouz-fri, gand eur paotr yaouank ; mab an aotrou X... an hini e oa, hag a lavaras dezañ :

« Deut ganin d'ar gêr. Erru ez eus eul lizer evidoh, a Wengamp. »

« Feiz 'ta ! Daoust piou a hellfe skriva din ? »

« Ho tud, eme an den yaouank. Va zad en-deus skrivet deze ha me 'gred ez eus arhant evid kas ahanoh d'ar gêr. »

Gwir e oa. Eur pred mad, servijet d'ar paour-kêz, d'an abardaez, a roas dezañ nerz ha kalon a-raog kemer an hent-houarn evid mond da Wengamp.

Allaz ! stad e dud a oa ken gwaz hag e hini. Erru 'oa ar houlz gante da droha al liammou a stage aneze ouz o stad-buhez walleüruz, pe da vervel dindan ar beh.

Hogen, nag an tad nag ar vamm ne felle deze diskenn izelloh dirag o amezeien. Klask a reas Lemenig an tu da enebi ouz ar baourentez. E vamm he-devoa eur galon greñv ha taer, heb aon. Lemenig en em glevas ganti evid dispenn pez a chome c'hoaz euz an ti koz hag evid sevel, gand an dismantrou, eun ti nevez, bihan ha dister, mentet hepken diouz o stad.

Ha setu ar vamm galoneg o tiskenn eun nebeud pazennou evid beva eur vuhez disterroh c'hoaz, hep koll he nerz kalon, seder bepred.

Lemenig, euz e du, a gavas e Bro-Hall eur skol nevez evid gounid e vuhez, e Rochefort-war-vor. Red eo lavaroud koulskoude ne oa ket troet e hoant etrezeg ar gêr-mañ. Abaoe ma oa eet d'an Oriant, eur vouez a-ziabarz a lavare dezañ :

« Da skolach Chaptal ez i da vestr-studi. »

Hogen daoust dezañ beza 'n em gavet a-wechou, en eur dremen e Pariz, dirag dor ar skolach-mañ, eun dra bennag a harze outañ mond da houlenn beza degemeret ennañ.

Mamm Lemenig

Red-mad ez eo bremañ komz eun tammig euz mamm Lemenig. Ganet er Brugou, e parrez Graz, savet e oa bet er vrasa furnez. Ar zul ez ee da vale gand eun amezegez euz he oad, ganet evelt er bloavez 1818. Houmañ 'oa eur penn-skañv hag a yee war-raog, heh-unan, pa ne blije ket gand merh ar Brugou mond ganti.

Eur zulvez eta, goude kreisteiz, an amezegez 'erruas er Brugou.

« Klev 'ta, Katrin ar Barz, emezi, eun dra bennag am-eus da lavaroud dit. »

« Lavar, mar deo mad klevoud. »

« Ma ! Ober a rin, hervez da hoant. Disul diweza ez on bet o weled sorserez Pabu. Ne gredi ket pezh he-deus lavaret din diwar da benn. »

« Petra 'ta a hell lavaroud diwarnon ? »

« Setu amañ he homzou : Lavar da Gatrin ar Barz am-eus traou euz ar henta pouez da zisklêria dezi, hag ez eo red dezi dond d'o hlevoud disul genta goude kreisteiz. »

« Felloud a ra dezi eta lavaroud din-me va flanedenn ? N'ez eus ezomm ebed. »

Kement ha kement a reas ar plah yaouank ken e redas an diou vignonez bete ti sorserez Pabu. Erru en ti-pri 'leh ma chome houmañ, setu ar wraha da grial :

« A-hañ ! Setu te deut da glevoud da blanedenn, Katrin ar Barz. Diskennet eo da lorh eta : diskenn a raio c'hoaz izelloh. Selaou ahanon, merhig, ha te a welo n'em-eus ket distroet ahanout diwar da blijadur evid netra :

Koant evel ma'z out, ha faro evel ma plij dit beza, e heller kredi e timezi abred. Ne ri ket, koulskoude. Da bried a vezo eun intañv, eun tiad bugale dezañ. Te da-unan az-pezo kalz a vugale ; hogen gweloud a ri aneze oll o vervel, nemed unan pe zaou. Amzer genta da briedelez a vezo evidout an hini wella. Mond a ri goude, a-eneb da hoant, pell-pell diouz da gerent. Ha neuze te a vezo dindan gwalenn ar reuz. O ! te a stourmo, rag bez' ah-eus eur galon greñv. Paour e vezi pa zeuio ganit dond war da giz e-kreiz da dud, ha paourroh e vezi c'hoaz goude, rag pa vezo deut ar gozni, e kuitai da vro evid mond pell da guzad da zienez. Pa'z-pezo gouzañvet oll boaniou ar bed, e tostai d'az pro da vervel, ha da gorv a vezo beredet e parrez Graz. Hogen eur pennad a-raog da varo, eur priñs a zeuio da weloud ahanout. Kerz bremañ, ha dalh soñj euz ar pezh a lavaras dit sorserez Pabu. »

Diwez ar poaniou

Echu ar bloavez-skol e Rochefort, Lemenig a dostaas da Bariz. E kêr Blois e tremenas ar bloaz war-lerh. Ar gwalleur a skoas neuze gand kement a herr war e dud ken e rankjont, tad ha mamm, mond pep hini en e du. Ar vamm a yeas da Bariz gand he mibien ; an tad a oe degemeret gand e vab beleg.

Lemenig, e-pad an amzer-ze, a glaske tu da vond da gaoud e vamm da Bariz. Erru miz eost, setu-eñ o kuitaad Blois, pounnerroh eged biskoaz ar zamm war e ziouskoaz.

Bete miz du e tremenas e amzer e Pariz o tiluzia meur a dra evid hemañ hag hennez, paet nebeud. Hogen ar vouez a lavaras c'hoaz :

« Mond a ri da skolach Chaptal. »

Hag eñ o vond da weloud ar rener evid en em ginnig evel mestr-skol. Med dre ne oa ket bet peurechuet e studi, ar rener a lavaras dezañ :

« Gortozit ! Selloud a rin ouz kement-mañ. »

Paperou ar paotr yaouank a oa euz ar re wella, ha setu, an deiz war-lerh, e oe galvet da zond da gregi gand e labour.

Ar vouez n'he-devoa ket faziet Lemenig.

Tremen deg vloaz e chomas Lemenig e skolach Chaptal ha pa hen kuitas e oe evid mond evel skrivagner e Ti-Kêr Pariz. Med amañ, koulz hag e skolach Chaptal, kaer en-deus bet poania, eun nerz didrehuz a stagas anezañ ouz eur stad izel.

Maro e Vamm

Hogen distaget en-devoa e vamm diouz he stad haro, en servij ar re all. Savet en-devoa eviti eun tiegez nevez ha setu Katrin ar Barz o weloud diwez he foaniou, ar poaniou diouganet dezi gand sorserez Pabu. Med bepred e houlenne digand he mab :

« Pegoulz e kasi ahanon da Hraz ? »

Er bloaz 1889, Lemerig a roas dezi ar blijadur-ze.

Pegen laouen e oa ar vamm, daoust dezi soñjal aliez en diouganou ar wrah ! Erru e Graz, e-touez he herent, e kouezas he nerz tamm-ha-tamm. Pa'z ee Lemenig da weloud anezi, beb gwech e kleve ar goulenn-mañ :

« Bremañ e hortozan ar priñs a dle dond da weloud ahanon. Pa'z eo bet sevenet an diouganou all, ar peurrest aneze a vezo sevenet ivez. A beleh e teuio ar priñs ? Petra 'n-eus da laavroud din ? Petra a gredez-te, va mab ? »

Lemenig a ree euz e wella evid distrei spered e vamm diwar ar priñs-se, med ne deue ket a-benn d'hen ober.

Eñ e-unan ne grede ket nah ouz e vamm donedigez ar priñs peogwir e oa ken sklêr diouganou all ar wrah.

Eur zadornez vintin a vezeven 1891, Lemenig a zegemeras, e Pariz, eul lizer hag a gemenne dezañ e oa maro e vamm. An deiz war-lerh e oa e Graz e-kichenn ar horv kêz, gouzañvet gantañ kement ha kement a boaniou er bed-mañ, ar horv e vervas ennañ eur galon ken kreñv ha ken joañz, a gemere ar boaniou-ze evel gounidegeziou, peogwir, e-kreiz ar re vrasa, e kleve Lemenig e vamm o lavaroud :

« Pa n'hallan trehi war ar reiz, me a ra fae outañ. »

Ha seblantoud a ree d'ar mab tener klevoud ar vouez kêz o lavaroud dezañ eur wech ouspenn :

« Sav da galon, va mab, ha 'n em difenn euz an daelou. Te ez eo Yann Montfort, te 'oar ze, Yann Montfort a Istor Breiz. »

Ha neuze e teue da zoñj da Lemenig he-devoa tremenet he bloaveziou diweza o lenn Hanez Breiz-Izel hag hini Breiz-Veur, ha penaoz, du-hont, e Pariz, eh ankoueze heh amzer fall o vrezonegi diar-benn rouanez ha duked Breiz. Ha bepred e teue war he diweuz ar ger :

« Te ez eo Yann Montfort, va mab. Dalh mad da zervij Breiz-Izel. »

Douaret e oe Katrin ar Barz e bered Graz, dindan bannou eun heol klouar, ha dindan eun oabl digoumoul. An daelou a zivere a zaoulagad Lemenig en eur zoñjal pegen kriz e oa bet ar vuhez eviti.

Distroet da di ar genitervez he-devoa eveziet e vamm e-pad diweza miziou he buhez, e houlenas ha priñs ebed ne oa deut da weloud e vamm.

« N'ez eus deut a-bell nemedoh. »

Ha Lemenig a reas eul lamm war e gador, med ne lavaras ger. Neuze 'ta, eñ e-unan e oa ar priñs !

Buhez nevez

Lemenig den a bluenn

Raktal ma oe degouezet Lemenig e Pariz, evid an eil gwech, e kavas ar gwella degemer e-touez ar skrivagnerien, daoust dezañ beza Breizad. Koulskoude, evel m'ema kont gand an oll

Hallaoued, ar re-mañ ne oant ket troet mad gand ar Vreiziz. Ar Republikaned a felle gante hag a fell gante c'hoaz selloud tud Vreiz evel sperejou divalo, sachet dalhmad war a-dreñv ha pennfollet gand eur garantez diboell evid rouelez ar Frañs. Kaer en-devoa Lemerig displega ar wirionez dirag o daoulagad, n'errue ket da sklêrijenni o spered. Pa welas ne oa gwir ebed da hortoz euz ar seurt sperejou, e soñjas : « Marteze ez eo red d'ar bed beza evel-se. » Eur wech stag ouz skolach Chaptal, en em lakaas da skriva, nehed eun tamm o soñjal ne deuje biken a-benn da halloud embann e labouriou e Pariz.

Hogen ne zaleas ket pell da weloud e zanevellou moulet, paeet dezañ ha lennet gand an oll.

Galvet e oe neuze da veza, e-pad eun toullad blaoveziou, sekretour ar *Magazine pittoresque*.

Êzet e vije bet dezañ beva gand e bluenn mar ne vije ket bet gweloh gantañ derhel gand e genta vicher, rag ne oa ket a lorch ennañ 'vel ma'z eus en darn-vuia euz ar skrivagnerien. Koulskoude en-devoa plijadur o weloud e save dioustu e-kichenn hag e renk ar re o-devoa greet dezañ degemer vad. Med n'en-devoa nemed berr amzer da rei d'al lizeradur ; n'ez eo nemed a-bell-da-bell e helle disklêria eun dra bennag er helaouennou.

Hogen an oll dorjou a oa digor frank dirazañ. Ar vuhez a zeblante gwellaad.

Setu-eñ eta mesket gand ar bed. Selloud a ree en-dro dezañ gand daoulagad lemm. Klask a ree gouzoud petra 'oa e spered tud Pariz ha dindan o zevenidigez. E deod 'oa ken lemm hag e zaoulagad, hag abred en em ziskouezas gouest da hoari dre gomz 'mesk an dud. N'ez eus bet den hevalaroh eged Lemenig.

Goude eun nebeud bloaveziou tremenet oh ober anaoudegez gand ar Gêr-Veur, e seblantas dezañ e oa diou lodenn etre e vignoned : an eil re hag ar re all a felle deze sacha anezañ d'o zu, paka anezañ, hag en em zervij dioutañ. Ne reas van ebed. Pa wele eun den bennag o sevel warnañ eur habestr, hag eur habestr alaouret e vije, Lemenig a vreskenne raktal, rag chom digabestr a felle dezañ, na pa vije red menel paour. Azaleg ma houneze bara, ne hoantae ket kaoud druzoni warnañ. Hag eur stourm nevez 'n em veske, er hiz-se, gand e vuhez.

Souezet e oa gand eun dra. An dud yaouank a beb oad, a oa en-dro dezañ, ne gomzent nemed euz o skoazellerien. Hemañ en-devoa bet eur stad vad gand skoazell an Aotrou Hen-ha-Hen : eun ali a oa degemeret skrivagnour en eur gelaouenn vraz dre hras an Aotrou, pe an I. Taersteredenn ; egile a oa deut eur gounid all dezañ gand skoazell eun den braz all bennag.

« Ha me n'am-eus skoazell ebed, a zoñje Lemenig. En tu-hont da ze, paour ha dister ez on ; va mamm a zo bremañ o serviji hag ez an, va-unan, da ginnig oberou va spered. Degemeret on koulskoude gand kemend a evez hag ar baotred yaouank a zo pinvidig ha paeroniet. Perag se ? Me 'oar a-walh n'ez eo ket va zalvoudegez a ro din an eurvad-se. A beleh eta e teu hemañ din, evel pa vefe eur priñs kuzet bennag o vlenia va buhez. »

Ya, bleniet e oa e vuhez, e gwirionez ! Pep tra a veze eeunet gand evez evid rei dezañ, euz eun tu, bara hervez e ezomm, hag euz eun tu all brud vad, brud eun den yaouank a dalvoudegez. E hounidigez a oa mentet dezañ gand e skoazellour kuzet evid miroud outañ da zevel d'eur stad lorhuz. Nag a wech ez eus bet degouezet gantañ beza tost da vedi frouez e labour, meulet gand an oll ha gweloud, d'an diwez, ar frouez-mañ o teuzi en e zaoarn.

E-pad e vuhez, koulz lared, kement gwech en-deus labouret evitañ e-unan, an dra-ze a zo c'hoarvezet gantañ. Keid ma'z eo bet chomet e skolach Chaptal, da lavaroud eo deg vloaz, keid ma'z eo bet chomet e Ti-Kêr Pariz, da lavaroud eo ugent vloaz, ez eo bet dalhet en eur stad izel, kaer e-neus beza bet diskouezet e oa gouest, dre e ouiziegez, dre e skiant, da zevel d'an uhella stad. Enebour ebed koulskodue ne zavas dirazañ.

« Va gwir am-eus bet, emezañ, pa 'm-eus bet va lodenn a boan hag a eurvad. Perag goulenn ouspenn ? »

Skriva 'ree eta bepred evid ar helaouennou hag ar helaouennou-kelh. Danevllou koant a zivere, gwech an amzer, diouz e bluenn ampart, hag ivez skridou talvouduz war an ijinou-kaer. Ha derhel a ree gand e ziou vicher.

Hogen biskoaz ne hoantaas ober eun dastumadenn euz e oberou. Ha setu perag ez eo red klask aneze du-mañ ha du-hont e-touez berniou paper al Levrgell Vroadel.

War-dro e bemp bloaz ha daou-ugent e tegouezas gantañ degemer kinnigou talvouduz a-berz skrivagnerien kelaoeunnou Pariz.

« Ahanta, emezañ, daoust ha skuiza a raio ar baourentez da zerhel ahanon en heveleb stad ? »

Etre beuzi ha neu

Ya, hen derhel a reas ! Rag erru e oa evid Lemenig ar houlz da baea al labour greet gantañ noz ha deiz abaoe e eil diskenn e Pariz, pemp bloaz warn-ugent a oa. E yehed a oa fêz dindan ar beh. Ne gouezas kleñved ebed warnañ, med e nerz a oa lamet digantañ. Red ez eo ivez lavaroud ne oa bet biskoaz en e benn kemend a vennoziou kaer diwar-benn Breiz, ar Gelted hag ar Barzaz. Eur vuhez nevez, koulz lavaroud, a vevas diwar neuze.

Paour e oa, e gwirionez, med paour heb dienez. Evid diskuiza e oa red-mad dezañ leuskel eur vicher : diou a oa unan a re. Teurel a reas e bluenn a-gostez, gand furnez evid miroud e stad en Ti-Kêr. Ha setu penaoz, eur wech ouspenn, e oa harzet da vedi e bark goude beza labouret anezañ euz ar gwella, heb ehan, ha beza lakeet ennañ gwella had e spered hag e galon.

Hogen Breiz a vezo ar gwella bremañ euz mennoziou kaer e spered. Gwelet ez eus bet penaoz e talhe d'e vrezonég pa oa o chom gand e vamm, ha penaoz e veze aliez meneg etreze euz ar vamm-vro garet.

E wella skridou a oe greet evid difenn e vro hag e ouenn dirag an oll, hag evid sevel aneze dreist d'ar re all. Diskouez a reas en-devoa lemnet mad e zent ouz dero Bro-Hall. Den ne drehe warnañ na dre gomz, na dre skrid, pa stourme evid e vamm-vro.

Planedennou

Meur a wech en em gavas Lemenig e bodadennou tud vraz 'leh ma vije itronezed hag a felle deze lenn ar blanedenn e dorn pep hini, pe 'n eur hiz all. Lennet e vije dezañ e hini evel d'ar re all. Hogen an oll blanedennou a ziougane dezañ kement-mañ : « Bez' ho-pezo eur mignon e-touez brasa tud Pariz, hag a garo ahanoh dreist-oll ; hennez a zo pinvidig ha gwisket eo gand dillad alaouret an dud e-karg. Dimezi a refet gand eun dimezell hag he-deus melenna bleo a zo e Pariz... »

Eur wech e houlennas diagnd unan :

« Perag ne lennit ket va flanedenn penn-da-benn ? »

« Abalamour, emezi, ne vez ket lennet d'an dud pezo a zo re gaer, pe pezo a zo re griz. Arabad eo pennfolli aneze. Difennet eo. »

Koulskoude, pell amzer goude, unan a zisplegas dezañ e blanedenn war heh hed.

« O ! emezi, biskoaz kemend-all ! Eur blanedenn dispar ez eo hoh-hini. Ken kaer evel ma'z eo, ne gredan ket lenn anezi deoh a-raog beza klevet ali eur vignonez am-eus. »

Hogen eun nebeud deziou goude e lavaras da Lemenig :

« Biskoaz n'ez eus bet gwelet planedenn gaeroh eged hoh-hini. En tu all ema d'ar binvidigez ha zoken d'ar rouelez. Piou oh eta ? »

« Piou ? eme Lemenig, eur paour-kêz den, labouret gantañ euz e wella heb galloud tenna frouez euz e labour. »

Koulskoude, greet en-devoa an dimezi a oa bet diouganet dezañ. Kavoud a reas, eun deiz, eun dimezell a vleo melen, merh al liver brudet Edouard Krug, livezez hi heh-unan, a skol he zad, hag a asantas dond da veza Bretonnez o timezi gantañ.

E-touez mignoned kerent an dimezell-mañ e oa tud hag e heller lavoroud dioute e oant tud vraz. Unan aneze, an hini kosa, an Ao. Charles-Louis Muller, daouzeg vloaz ha tri-ugent, a blijas Lemenig dezañ hag e karas anezañ evel eur mab. Red ez eo din lavaroud amañ e oa Lemenig eun den kaer, eur “gentleman“ euz an dibab, eun den hag a oueze en em zerhel dre-oll, komz d’ar houlz, tevel pa veze mad, ha komz bepred gand spered. Biskoaz den n’eo bet sellet gand muih a zoujañs na selaouet gand kemend a blijadur. An Ao. Ch.-L. Muller a oa ivez eul liver hag unan euz ar re vrudeta, ezel euz “Insritut“ Bro-Hall.

Ha setu planedenn Lemenig sevenet adarre, war daou boent da vihana.

Petra a zegouezfe gand ar poñchou all bet kuzet outañ pell ha disklêriet d’an diwez ne oa ket pell ?

Tri bloaz goude, an diouganerez a lavaras dezañ :

« Gouzoud a ran bremañ ez oh bet kaset war an douar da veza pez eo bet Arzur ha Marzin. »

« Chegon ‘ta ! », eme Lemenig, diskredig c’hoaz war dalvoudegez ar blanedenn-ze. « Chegon ! setu aze eun taol ! »

« Ya, emezi, ha labour ho-pezo kement ha ma hellfed ober evid lakaad urz e Breiz-Izel hag er broiou all. Abaoe pell-amzer ema an dud o houlen eur Zalver. C’hwil an hini eo, nag e vefe ‘eneb d’ho youl. »

Hag an itron-mañ a gomze ken kreñv hag e vamm pa lavare : « Te ez eo Yann Montfort », ha ken kreñv ha Katell Goelo pa lavare : « Te a vezo eskob d’an nebeuta. »

E gwirionez, abaoe ma oa bihan, Lemenig en devoa kustumet gweloud en e vuhez traou souezuz evel-henn, kement ha ken aliez, ken ne ree ken van dioute. Hogen, dre ne oa an itron-mañ na Bretonnez na kar dezañ, ha dre ma oa eur spered uhel, mar bez, Lemenig a oe estlammet.

« Petra a venn euz kement-mañ ? Perag abaoe ma’z on er bed am-eus gwelet en-dro din traou dreist-ordinal ? Perag em-eus kavet, en tu-hont d’an diouganerezed, kemend a dud a skiant hag a lavaras din diwall beza diskaret gand ar gwalleur hag a erruje ganin eur maread oberou braz hag uhel. Perag an dra-mañ ? Perag an dra-hont ? »

Setu pez a zo gwir : Lemenig a oa bet ken flemmet gand degoueziou ar vuhez ken ne grede ket e hellje biken kaoud eur blanedenn uhel ; kaset en-devoa er-mêz e spered, pell a oa, ar spi da veza eun deiz den pinvidig ha gallouduz, den enoret, gand an dud, muih eged ne oa dleet d’e onestiz. Ne lakae ket eta kalz a fiziañs en diouganou. Tevel a ree, zoken, war gemend-mañ, nemed eur wech bennag pa ‘n em gave gand eur Breizad mad a lavare dezañ ‘n eur hoarzin :

« Setu aze da betra en-deus talvezet din kaoud eur blanedenn ken kaer : erruet ez on da hounid va bara hepken. »

Hogen dre forz gweloud an dud en-dro dezañ, tud a bep stad, paotred ha merhed, o selloud anezañ evel eun den a-uz d’e stad, hag o hortoz euz e berz oberou dispar, dre forz gweloud zoken al loened, int o-unan, oh ober enor braz dezañ ; dre forz ivez anaoud sklêr-mad e plede gand e vuhez (pe dre hrad-vad, pe dre hrad-fall) ar galloudou a zo ‘uz d’ar bed, Lemenig a oe red-mad dezañ beza war e evez dirag ar burzudou-mañ.

Kavet e vezo amañ eun nebeud doareou euz e vuhez, kontet gantañ d’eur heveil bennag. Marteze ne guzas netra, marteze e reas ivez. Hogen evid pez a zell diouganou Marzin, pe ouz re all, ez eo êzet gweloud ez int bet sevenet en-dro dezañ. Ganet ez eo e-kreiz Breiz, e kêrig Rostren ; eet ez eo bet da Vro-Hall da dremen eul lodenn vraz euz e vuhez ha da stourm pe da

lemma e zent ; erru 'oa gwenn e vleo a-raog ma krogas gand e oberou kaer ; chomet ez eo paour nemed, koulskoude, e-pad eur mare berr, bet gantañ peadra a-walh da zegemer en e di ar Vretoned a zeue da Bariz da zaludi anezañ, da domma o halon ouz e hini, ha da entana o spered ouz e spered.

Ha n'ez eo ket 'ta sevenet an diouganou ? Kerzed a ra bremañ ar hirri hep kezeg ;`kleuzet ez eo Pariz evel eur goloenn wenan. An neb a zo emskianteg ha sklêrijennet, a wel sklêr a-walh ez eus eun amzer nevez o tigeri.

Daoust ha n'ez eo ket bet Lemenig an hini a oe lakeet da gemenn troidell an traou hag an urz nevez ? Na beza ez eo ? Na beza n'ez eo ket ? Va hredenn a zo din war gement-mañ ; hoh-hini a zo deoh.

Hogen pezh a hellan lavaroud ez eo kement-mañ ; Ne gredan ket e vefe kavet eun den sevenet gantañ, koulz ha gand Lemenig, an diouganou ; eun den hag en-deus bet kemend a lealded, kemend a galon, kemend a spered, lakeet oll e servij e ouenn. Kement-se a zo a-walh evid rei din an aotreadur da embann al levrig-mañ.

Pa vezo lennet pezh a zo war-lerh, marteze en em gavo, koulz e Breiz-Veur hag e Breiz-Izel, meur a hini a heveleb mennoz ganin. Gwelet e vezo hebdale hag-eñ ez eo ar mennoz-se hini ar sperejou uhel a zo o vlenia ar bed dindan beli an Oll-halloudeg.

II

Ar Galon

Petra eo ar Barz ?
Eur Helt emskianteg ha galvet.

Lemenig.

Lemenig ha Breiz-Izel

Chom a raio kuzet an diouganou didest a zo tremenet e buhez Lemenig. Hogen ar re o-deus bet testou, ez eo arabad o miroud kuzet. Darn euz an degoueziou-mañ o-deus bet meur a dest.

Lavaret ez eus bet el levrig-mañ penaoz Lemenig n'ankounc'hae ket e vamm Breiz ; penaoz n'en-devoa mennoz all ebed ken birvidig. labourad a ree, herrta m'halle, evid anaoud doare e ouenn-dud azaleg amzer ar ragistorvez bete on amzer-ni ; ar gredenn goz, al lezennou, ar hustumou ha pep tra a zo mad da sklêrijenni ar spered war zoareou Breiz.

Me a zo test ez eo bet skoazellet kaer en e studi gand an disklêriadenn-mañ : Ar Vretoned a zo bet lakeet gand an Tad Oll-Halloudeg, koulz war zouar Breiz-Veur ha war zouar Breiz-Izel, evid beza, da virviken, skoazellourien ar poblou all, evid beza o blenierien war hent ar Gwelladur denel, evid beza kelenourien ar sperejou war anaoudegez ar Wirionez.

Gwech-ha-gwech all, abaoe 1881, e tegoueze gantañ mond da weloud e gerent e Breiz. Oll e oant kouerien, tud diwar ar mêz ; ha laouen en em gave en o mesk. Brezonega, mond ha dond dre ar parkeier, evel ma ree en e vugaleaj ; tremen er pardonioù ; komz gand ar vederien, an dornerien ; heul ar gudenn bep sul, gand an dud yaouank, en-dro d'ar chapel, setu peleh e oa e blijadur vrasa. Skrivet en-deus meur a zanevell gaer goude beza bevet evel-se e-touez ar gouerien.

Lemenig diouganer

Eun hanter-vreur dezañ a oa person e Plouleh, e-kichenn Lannuon. Hemañ a gare kaoud Lemenig en e di, ha Lemenig a gare ivez beva eun nebeud deziou e parrez e vreur, rag eno e kave ar mor braz hag ar vordeidi, tud hag a blijje dezañ darempredi gante, der ma'z int tud eeun hag a galon zigor.

Eur bloavez eta, deuet, hervez e gustum, da weloud e vreur, eh erruas gantañ degoueziou souezuz.

Eun noz a viz east, goude koan, an amzer en em gave ken sklêr ken e c'hoantaas gand ar person mond d'ober eun dro-vale war an heñchou. Tana a reas e gorn. Lemenig a rollas eun ibil-butun, hag int er-mêz. Ar stered a lugerne en oabl, hag ar mor a drouze du-hont, gand eur vouez divent ; ar peoh a vale sioul dre ar parkou ; an êr a oa materiet gand c'hwez-vad ar vamm-gamill.

Ar beleg kêz en-devoa eur zoñj. Eur wech eet er-mêz ar vourh, eñ ha lavaroud da Lemenig :

« Brao eo an oabl hag an douar henoz. Oberou kaer ez int. Pehini eo da vennoz war grouidigez ar bed ? »

« O ! Ola !, eme Lemenig. « Daoust ha c'hoant az-pefe da govesaad ahanon ? »

« N'em-eus ket, da ! », eme ar person. « Med me 'gred az-teus eun dra bennag da lavaroud din ha n'ez eo ket heñvel ouz va hredenn-me. »

« Ta 'ya da glevoud eta, rag n'em-eus netra da guzad. Selaou ahanon da vad neuze. »

« Ober a ran », eme ar beleg.

« Ma ! kredi 'ran ez eo birvidig ar vuhez dre-oll en neñvou hag er pell-vedou evel an heol, an douar, al loar hag ar stered a zo o vale dre ar bed divent. War horre an douar, daoulagad an oll a wel a-walh ar vervadenn-ze a laka an ed da hegina ha da zarevi, an deliou da zifluka war ar gwez, ar frouez d'en em stumma, ha dreist-oll al loened da gaoud eur vuhez implijet ken kaer gante. Hogen dindan gorre bevuz an douar ez eus kemend-all a vuhez ; er mein, int o-unan, ema ar vuhez koulz hag en on izili. N'hallfe den kaoud eul lehig da dremen ennañ beg eur spillenn hep kaoud buhez o vervi². »

« Hag an hent-mañ, ken kaled dindan on zreid, na bervuz ez eo ivez ? », eme ar person, 'n eur hoarzin.

« Ya, eme Lemenig, med kement-se ne welom ket, rag on daoulagad a zo bet roet dim evid serviji on ezommou, ha netra ken. Koulskoude, gwech ha gwech all, e welom en-dro dim degoueziou hag a zo da houzoud ez eus, e-kreiz an douar, eur vervadenn divent. War galz a veneziou ez eus toullou, darn stouvet, darn distouv, hag ar re-mañ a daol en êr tan ha moged, ha mein, distaget a-greiz an douar. Hag eüruz ar broiou o-deus toullou-tan da rei digor d'ar vervadenn izdouareg. E Breiz n'ez eus hini, ha mar errufe d'ar vervadenn dastum heh oll galloud dindan douar or bro, gorre Breiz a lammfe d'an neñv ; pe c'hoaz e hallfe an douar 'n em faouta ha digeri toullou braz e-leh ma kouezfe tud ha loened, tier ha gwez. Ha dre-ze an hent-mañ ma valeom warnañ bremañ dizoursi, a hellfe 'n em ranna dindan on zreid ha lonka ahanom evel eul loiad soubenn. »

« Feiz ! 'Vad !, eme ar person, n'ez eo ket brao da gredenn. »

« Beza ez eo, eme Lemenig, rag pezh a lavaran dit bremañ n'ez eo nemed eul lodennig dioute. »

« Ma ! disklêria a ri din ar peurrest eur wech all. »

« Evel ma kari. »

Ar person ne laras ger ouspenn : batet e oa. Hag e tistrojont o-daou d'ar gêr en eur zoñjal.

An deiz war-lerh, da eiz eur vintin, goude e overenn, ar person a zeuas da leina gand eun tamm bara-segal, eun tamm kig-sall hag eur werennad jistr.

² Notenn gand an oberour : D'ar houlez-mañ ne oa brud ebed c'hoaz euz an disklêriadennou gouizieg a zo bet greet abaoe hag a zo bremañ, koulz lared, artiklou a feiz evid ar ouizeien (da heul kavidigez ar "Radium" dreist-oll.

Lemenig a hortoze anezañ. Ha setu-int da gomz diwar-benn an amzer a ree.

Ar person, koulskoude, a daole sellou a-dreuz war e vreur. N'ankounac'hee ket ar gaozeadenn o-devoa greet an deiz diaraog da noz hag e klaske displega e vennoz, rag Lemenig en-devoa lavaret : « Beza am-eus c'hoaz. » Petra a zeuje goude en-dije komzet ?

Ar respont a zeuas, med ne oa ket euz genou ar beleg. Ar respont a zeuas ken spontuz ha ma helle dond.

E-kreiz merenn, paotr al lizerou a erruas d'ober e dro, hag ar vatez, hogoz raktal, a zegasas ar helaouennou d'ar person ouz taol. Hemañ a grogas gante, eüruz da helloud distrei e spered war eun dra bennag. Displega a reas eta unan aneze hag a deue euz Pariz.

Ha Lemenig, o weloud e vreur o tond da veza gwenn evel eul lien :

« Petra 'zo erru ganit ? » , emezañ.

« Sell ! » eme ar beleg, 'n eur rei ar gelaouenn dezañ.

Ha Lemenig da lenn :

« **Degouez spontuz e Java.** – Eun enezenn hag 20.000 a dud lonket gand ar mor. Eun enezenn reier savet e-kichenn, euz goueled ar mor. »

Rik ar pezh en-devoa lavaret Lemenig an noz diaraog. Ar paotr kêz beleg spontet, ken e krene, a zelle ouz e vreur evel pa vije bet hemañ eun êl pe eun diaoul. Sklêr a-walh e oa e houlenne ennañ e-unan :

« Daoust hag-eñ e ouie hemañ, deh da noz, pezh on-eus gouvezet amañ ar beure-mañ hepken ? Ne ouie ket, me 'zo sur. Petore den ez eo eta va breur ?

Lemenig ne reas van ebed ha ne oe ken komzet nag euz an douar nag euz an neñv.

Lemenig, den heb aon

Eur wech all e oe pedet Lemenig gand kabiten eul lestr koant, a oa e porzig-mor ar Yeoded, da vond gantañ war e lestr d'ober eur valeadenn beteg enez Sieg. War asant Lemenig e oe greet emgleo ha dibabet e oe an deiz. Hemañ a oe lakeet ar 4 a viz Gwengolo 1883. Da 7 eur vintin e vije displeget al lien ha mar n'erruje ket Lemenig war-benn neuze, gwaz evitañ ! Al lestr ne hortozje ket anezañ. Hogen eur wech e-barz al lestr, er mor braz, diwall mad dezañ kaoud poan-galon, pe spont, pe c'hoaz da zouza.

D'an 3 e savas eur barr-arne 'vel ne oa ket bet gwelet abaoe pell-amzer. Ar mor a lamme war ar reier gand eur hounnar euzuz. An avel a youhe hag a rede 'n eur derri ar gwez war ar hleuziou hag o leda aneze a-dreuz an heñchou.

E-pad an noz, den n'hellas kousked gand an dourni a ree an avel hag ar glao. Gwasad amzer ! Lemenig a zoñje e oa red dezañ mond d'ar Yeoded an deiz war-lerh. Eur banerad boued zoken 'oa bet aozet evitañ hag evid ar vartoloded gand bep seurt debraj hag evaj.

« Ne vezo ket brao ar mor », a zoñje en e wele.

N'eus forz ! Da bemp eur e savas hag en em wiskas, ha setu-eñ eur pennadig goude, ar baner war e gein, war hent ar Yeoded. Truezuz a-walh 'oa an hent gand ar gwez draillet ha gand ar poullou-dour.

Erruoud a reas er porzig eur pennad a-raog seiz eur. Souezet 'oa an dud o weloud anezañ o tremen, rag an oll, er Yeoded, a ouie e zoare. An eil hag egile a lavare dezañ :

« Ne dalvez ket deoh, aotrou Yann. Gand an amzer-mañ al lestr n'ez aio ket er-mêz. »

« Ma ! eme Lemenig, neuze eh adlemerin hent ar gêr. »

« Galloud a rit hen kemer raktal. »

« Red eo din gweloud kabiten al lestr da genta. »

Ha setu-eñ dirag ar habiten :

« O ! 'vad ! eme hemañ, n'houllfeh ket mond er-mêz e-kreiz eur seurt arne ! »

« Pa ‘m-eus roet va ger, eme Lemenig, ne zouzin ket. Mar chom al lestr er porz, me a yelo d’ar gêr, med mar da er-mêz, me a yelo gantañ. »

« Ne deufet ket ! Na petra ‘lavarfe ho preur ! »

« Va breur ? Va breur ne blijfe ket dezañ klevoud am-eus bet aon. »

Ar habiten n’en-devoa c’hoant ebed da vond war vor. Goude beza pedet Lemenig, en eur ober eun tammig goap outañ, dre ne oa ket merdead, setu bremañ ne houll ket souza, med lakaad Lemenig da zouza a oa gwelloc’h gantañ.

Koll a reas e amzer. Goude eun hanter- eur tremenet o tiviza, red mad e oe pe souza a-grenn, pe mond er-mêz.

« Ma ! eme ar habiten, er-mêz eta ! »

An oll, en-dro d’ar porzig, a oa o hortoz Lemenig war e zistro d’ar vourh, gand ar c’hoant, marteze, da hogeal anezañ. Pa oe gwelet o tisplega ar gouelioù war al lestr, ar sperejou a droas. Den ne hoarze ken.

« Allaz ! Allaz ! daoust hag-eñ ez int dibenn a-walh evid mond er-mêz ! »

An dremmou a zeue da zua.

Kabiten al lestr ha Lemenig a gemeras ar vagig evid mond d’al lestr. Ha setu hemañ raktal da zevel an eor ha da gemer e herr, saludet gand an oll dud dastumet war ar reier, o hijal togou, ha mouchoueroù, hag o krial da Lemenig ha d’an dud a vor : »Kenavo ! kenavo ! »

E gwirionez, peadra a oa da veza spontet, rag eur wech erru er-mêz an aochou, al lestr a oe darhoet du-mañ, darhoet du-ze, war ar gwagennou, evel eur graoñenn.

Tro-ha-tro, Lemenig a wele barrikennou, plenken ha bep seurt traou o ruillal war an dour, hag e soñje e teuent euz eul lestr bennag bet draillet, e-kichenn, an noz diaraog. Hemañ a oe eur gwall devez da dremen.

Ar vartoloded, gand o labour, a zelle ouz Lemenig, en-gortoz, marteze, gweloud anezañ o kaoud ezomm a zikour ‘eneb ar mor pe ‘eneb ar boan-galon. Hogen an amzer a dremene ha Lemenig ne houllenne netra.

Da zeiz eur noz, p’erruas al lestr en enez Sieg, Lemenig a oa gleb-dour, rag, e-pad an deiz, e oa chomet war ar bourz. Hogen bremañ n’en-devoa ken da houzañv.

An nozvez a oa kaer evid distrei d’ar gêr. Peohet e oa ar mor ha ken sklêrijennet e oa gand goulouioù an oabl, ken e seblante gand Lemenig e oa al lestr o nijal dre an neñv...

An deiz war-lerh d’abardaez, Lemenig en em gave e Lannuon en eun ostaleri ‘leh ma oa kustum da vond, hag eno, ouz eun daol, e skrive eul lizer. En-dro d’eun daol all e oa eun nebeud paotred o vutunad, beb a wernnad vier diraze. Unan aneze a gomze :

« An aotrou hen-ha-hen, emezañ, a zo erru eun taol fall gantañ. E lestrig ken koant a oa eet er-mêz deh e-kreiz an arne... »

Lemenig a oa red dezañ klevoud peza lavare an den. Digeri a reas e ziskouarn :

« Ha beuzet eo bet al lestr, beuzet ar vartoloded, beuzet ivez breur person Plouleh, eet gante da vale war vor. »

Eur vousec’hoarzedenn a dremenas war vuzellou Lemenig :

« Allaz ‘ta ! emezañ, ennañ e-unan, eur wech, d’an nebeuta, am-bezo klevet konta va maro. »

An den a zalhe da gomz doare spontuz al lestr heb gouzoud e oa breur person Plouleh o selaou anezañ, rag Lomenig ne ree van ebed.

Azaleg neuze, an dud a vor, koulz hag ar gouerien, a anzavas kalon Lemenig. Hag eun deiz bennag ma tistroe a Lannuon, war droad, gand daou gouër, ar re-mañ a oe souezet o weloud petore kerzer e oa. Unan aneze ne gavas nemed kement-mañ da lavaroud dezañ :

« C’hwil avad a zo eun drailler mad ! »

Mestroniezh Lemenig

anzavet gand tud ha loened

Red e oa da Lemenig, nemed dall e vije, gweloud e oa kalz a dud a bep stad o hortoz, euz e berz, oberou dreist-ordinal.

Koulz e Pariz hag e Breiz, en-deus kavet tud hag a gomze gantañ euz e zoareou da zond. E Breiz, evel ma oa dleet, ez eo erruet ar re ar zouezusa azaleg e vugaleach.

Komzet em-eus eun nebeudig euz e blanedenn e Rostren. E Gwengamp em-eus diskouezet anezañ er skolach. Med meur a dra a vije c'hoaz da lavaroud.

Hirie a vezo sklêrijennet gand warhoaz

Setu amañ eun degouez ha ne lavar ket nemeur a dra pa zeller en e-unan, med gwelet e vezo pelloh en-devoa ivez eun dalvoudegez.

E mezeven, bloavezh 1868, rener ar skolach a hoantaas mond da ziskouez e skolaerien e bro Gallag. Eur beurevez e oe lakeet eun toullad aneze da bignad en tri pe bevar harr-bankou, ha war-raog etrezeg Kallag !

An amzer a oa kaer ha tomm ha beaji a oa brao. War-dro unneg eur an oll a ziskennas diouz ar gweturioù ha kelennien ha skolaerien a gerzas betek Karnoed. Treuzi a rejont ar vourh, hag int war-zu Tosenn Sant Gweltaz. Lemenig a oa e-touez ar skolaerien yaouank.

Eur wech erru war lein ar menez, e oe disklêriet d'ar grennarded al labour a zo bet greet war an douar-ze en amzer goz, ha Lemenig a zigore e zaoulagad war bep tra, dreist-oll war al labour savet e penn uhella ar menez : eur helh greet gand douar hag, en e greiz, eun toull greet evel pa vije bet da lakaad ennañ eur peul braz-divent. Klask a ree en e spered da betra en-devoa servijet al labour-ze ha ne gave ket, na den all, ne gave mui.

Goude eun eurvez bennag tremenet eno, ar valeerien a yeas da verenna da di eul labourer pinvidig a oa o chom e-kichenn. Eur haer a bred a oe greet er-mêz an ti, en disheol, ha levez e oa en-dro d'an daol. War an diwez, setu unan euz ar gelennerien, eun abad, o sevel, hag eñ da gana, gand eur vouez vrao, eur zonadenn greet ar bloaz diaraog, en enor da Vretoned Breiz-Veur deut da Zant-Brieg da weloud o breudeur a Vreiz-Izel. Ar zonadenn-ze a zo anvet *An diou Vreiz*. Kalon ar baotred yaouank a dride en o hreiz o klevoud an toniou koz displeget, ar gwerzioù ken mad da zevel ar spi er Vretoned.

Hogen distroet d'ar gêr, Lemenig ne ouie mui da betra e oa bet kaset d'ober anaoudegez gand Tosenn Sant Gweltaz : c'hweh vloaz ha tregont en-dije da hortoz a-raog beza sklêrijennet war gement-se.

An toaz e go

Lemenig a oa kroget da studia stard doareou gouenn-dud ar Vretoned abaoe ar bloavezh 1895, pa marteze eur bloaz bennag kentoh.

Er bloaz 1897 en em gavas e Rosko, gand e wreg, hag int eno da dremen ar miz ehan-hañv. Ober a reas Lemenig anaoudegez gand enezenn Vaz hag e welas ivez kêr Vontroulez.

Ar bloaz war-lerh, da vezeven, e teuas, adarre da Enez Vaz rag houmañ he-devoa plijet kalz dezañ gand heh iliz koz, gand he farkou hag he reier. Skrivet en-deus pennadou koant awenet dezañ e-pad e dremen er vro.

Er mare-mañ e oa krog Brezi-Izel da zevel oberou nevez. Eun dra bennag a oa en êr, evel ma c'hoarvez, gwech ha gwech all, a-dreuz an amzerioù. Daoust ha ne vefe ket trompill an eneoù o son e pevar avel ar vro !

E skolach Sant-Brieg ar helennour Frañsez Vallée hag ar studier yaouank Frañsez Jaffrennou a oa en em lakeet da studia ar brezoneg hag ar hembraeg, da lavaroiud eo brezoneg Bro-Geumri. Ha ken tomm goret e oa o halon, ken e tistroe kalz a baotred yaouank da labourad gante.

E-keit-se an Ao. Kloareg, kannad Montroulez, a zave eur strollad c'haorierien evid displega a-nevez c'hoariellou koz Breiz-Izel, kollet ar hiz aneze abaoe eun tregont vloaz bennag.

Lemenig a lamme e galon gand al levenez o weloud ar vuhez oh adkregi en Breiz hag eh en em unane muia ma helle gand ar Vreiziz kaloneg-mañ.

Hogen Bretoned ar vro ne blij ket deze nemeur Bretoned Pariz : aliez zoken ez eo bet gwelet Bretoned Breiz o pellaad dioute, Bretoned Pariz, goude beza implijet an oberou greet gand ar re-mañ. Red eo koulskoude asanti ez eo kerkoulz kalon e Bretoned Pari hag er re all pa'z int chomet feal da Vreiz, d'he yez ha d'he spered. Meur a hini a rank kuitaad e vammvro evid gounid e vuhez hag a chom bepred Breizad a galon hag a Spered.

Lemenig ne houlenne netra digand den. Labourad a ree sioul, hervez e hoant, war e vennoz ; hag e ree euz e wella, e gwirionez ; evel ma vezo gwelet, e skoazelle Breiz hag ar Vretoned, koz pe yaouank, en e bennadou-skrid. Eul levenez dispar e oa e hini o weloud Breiz o tihuni.

Ne zoñje netra mui o tond da Enezenn Vaz.

Mestroniez Lemenig war al loened

EN ENEZ VAZ. Eur beurevez e oa o vale gand e wreg, e tu ar reier, dirag Santeg. Balafennou bihan, pers o liou, a nije 'n eur hoari dindan bannou an heol, ha Lemenig hag e wreg a gemere plijadur o selloud oute, rag eun dra lirzin e oa kement-mañ. Eun nebeud dioute, evel pa o-dije intentet pezh a lavare an daou bried, en em lakaas da hoari-nij dirag Lemenig, hag eur pennad goude, setu teir aneze oh en em zistaga diouz ar re all, o trei ha o tistrei, evel o terhel da hoari, hag o tond, a-gevred, d'en em bega eeun war galon Lemenig.

« Sell 'ta ! a lavaras hemañ d'e bried. Diwallom da ober aon deze, ma welfom pegeid e chomfont amañ. »

Souezuz e oa gweloud loenedigou ken aonig hag ar re-mañ o chom seder war vruched an den. Lemenig a zalhas da vale pell amzer er hiz-se gand an teir balafenn. D'an diwez e kasas aneze kuit.

A-boan ma oant pellaet, Lemenig a gavas eur zouezenn all war e hent. Kalz a gillieried a zo en enez Vaz. Unan a ziskennas war ar wenojenn, eeun dirazañ, hag a chomas war an douar, e-kichenn e dreid, da zelloud outañ.

« Petra 'hoarvez gand al loened ar beure-mañ, a lavaras d'e wreg. »

Ha setu int o-daou chomet en o zav da zelloud ouz an evnig bihan a oa manet eno heb aon a-grenn. Lemenig a stouas evid tremen e zorn war diouaskell an evn, hag hemañ raktal a zavas en êr en eur gana.

E BRO-GEUMRI. Gweloud a raio c'hoaz Lemenig al loened o tond en-dro dezañ meur a wech.

Dalhet en-deveus soñj a gezeg kastell Llanover, e Bro-Geumri, 'leh ma 'n em gave e 1889. An Itron Herbert, perhenn ar hastell, a oa eet da gerhad Lemenig d'ar porz-houarn, en he gwetur, hag eun itron all ganti. Lemenig a zeuas gante, ha setu an Itron Herbert o lavaroud d'he blenier troha berr-ha-berr, dre ar park-liorz, e-leh heul an hent-braz penn-da-benn. Ar wetur en em gavas eta da redeg war yeot ar gozenn-liorz. Raktal, a bep tu, kuitaet gante ar peuri, kezeg koz a-strollad, en em lakaas da haloupad war-lerh ar wetur.

« Buannoh ! buannoh ! », a griev an I. Herbert.

« Perag ? », eme Lemenig, n'ez oh ket kustum da weloud aneze o redeg evel-se war-lerh ho kwetur ? »

« Biskoaz kemend-all n'am-boa gwelet », eme an Itron.

Ha setu Lemenig, distroet, oh êsa pellaad an anevaled 'n eur hija e dog. Ye da ! Ar hoz kezeg a zalhe da haloupad en-dro dezañ, hag o zellou warnañ, med sellou mad ha tener ha nann³ sellou droug.

C'hoarzet en-dije Lemenig ma vije bet eñ e-unan. Hag ar hezeg a zalhas d'e heul, ha dalhet o-dije moarvad pell amzer, paneved e troas ar wetur en-dro d'ar hastell.

E NORMAÑDI. E Normañdi e c'hoarvezas gantañ ivez eun dra bennag heñvel. Tremene a ree dre eur prad, gand eur plah yaouank, merh eur vignonez d'e wreg, hag er prad-se e oa ejened, saout, kezeg, leueou hag all, a-vagad, evel ma vez, war gozennoù an Normañdi. An daou valeer a yee war-raog heb selloud en-dro deze. Hogen eun dro bennag e tegouezas gante trei o fenn hag int o weloud an oll loened dastumet d'o heul. Ar plah yaouank a grogas ar spont enni, med Lemenig a ziskouezas dezi al loened chomet 'n o zav hep kerzed mui. Hag int o-daou da vond adarre, ha ken buan all, al loened da vond ivez war o lerh. Ha ken liez gwech e chome an daou valeer, ken liez all al loened a chome ivez. Hag ar c'hoari-mañ a badas ken ma oa eet Lemenig hag ar plah yaouank e-mêz ar prad.

Mestroniez Lemenig war an dud

Hogen ar souezusa n'ez eo ket gweled al loened oh heulia Lemenig ; an dud, ind-i o-unan, a zellas anezañ evel eur mestr : « C'hwi eo ar penn-rener », a zo bet lavaret dezañ aliez.

E PARIZ. Eur wech, e 1903, en em gavis gantañ 'n eur pred badiziant. Pa oe ar pred war e ziwez, an Ao. ar Gonideg a zavas d'ober eur brezegenn en enor d'ar paeron, d'ar vaeronez ha d'ar bugel ; ha setu-eñ, goude, o pleal gand tud ar pred :

« Hag en ho mesk, emezañ, ez eus eun den hag a zo eur gwir benn-rener. Hogen ne larin ket deoh e ano gand aon sevel gwarizi e kalonoù ar re all. »

Hag ouspenn eur zell a dremenas war Lemenig. Perag lavaroud ar gerioù-ze ? Daoust hag anavezoud a ree an Ao. Ar Gonideg an Diouganou ? Ne lavaras netra ousepenn ha koulskoude, eñ ivez, a helle kaoud anaoudegez euz an diouganou bet disklêriet gand eur gelaouenn a Bariz hag a oa lennet gantañ ha gand e dud. Disklêriet e oant bet ivez gand eur gelaouenn all lennet gand Bretoned Pariz ha gand eun nebeud Gallaoued.

Red eo lavaroud penaoz, er mare-mañ, an darn-vuia euz an dud, er Frañs, a oa en gortoz euz eur zalver.

C'hoaz e c'hoarvezas gand Lemenig beza sellet evel sevenet an diouganou ha lavaret e oa se dezañ zoken.

Eun itron vraz, oajet, a houlennas digantañ eun deiz bennag :

« Daoust hag-eñ ho-peus klevet komz euz eun diougan hag a zell ouz ho pro ? »

« Ya, moarvad », emezañ

« Ha gwir eo, emezi, e kredit ivez e vezo pleet gand ar relijion pa vezo erru ar houlz gand an diouganou da veza sevenet ? »

« Ya, emezañ, kredi 'ran kement-se. »

« Allaz ! eme an itron goz, gwaz a ze. »

Houmañ 'oa eur Brotestantez hag he-devoa aon rag eur gwall-zarvoud d'he relijion.

³ nann : galleg.

« Peleh ez oh-hu ganet ? », a houlenas c'hoaz.

« E-kreiz Breiz, e Rostren. »

« Ecce holo ! Ecce homo⁴ ! » a skrijas an itron.

Hag hi da zevel, da zaludi en-dro dezi ha da guitaad an ti. Ecce homo ! a oe an diweza ger klevet gand Lemenig a-berz an itron-mañ ; rag eun nebeud deziou goude, e koueze klañv, ha teir zizun goude e oe douaret.

E LEZNEVEN. Groom, mar karit, eun dibab e-touez meur a zegouez souezuz, erruet e Breiz gand Lemenig.

Er bloaz 1903 e oe pedet da vond da gendalh Kevredigez Broadel Breiz, e Lezneven. Ha dre ma oa, er mare-mañ, Drouiz Meur a Horsedd Gourenez Breiz-Izel, lidou ar Gorsez en-devoa da ren ivez.

Hogen ar yaou, 10 a Wengolo, goude al lidou barzeg greet e Plouneour-Trêz hag e Brignogan, e oa eur banvez e Lezneven.

War ziwed ar pred eun aotrou a zavas da brezegi hag a lavaras e vije kavet bepred, e Breiz, tud pennfollet evel Salaun ar Follgoad, gouest da ragadi evid o bro.

Lemenig, savet war e lerh, a lavaras :

« Trugarekaad a ran an Ao. C... a zo o paouez gervel Barzed Breiz tud pennfollet. Mar deo gwir, mad e vezo d'ar vro ha dezañ e-unan kaoud ar seurt pennou-mañ. Rag peogwir an dud fur ne gavont ket an tu da 'n em zavetei, piou a zavo d'o zavetei, mar n'eo ket ar pennou follet ? Ha neuze, da houzoud pere ez eo ar re zota : pe ar re a gave ar re all sperejou troet, heb gouzoud doare dioute, pe ar re a gomz da dud ar vro-mañ hervez o spered, hervez o ezommou, hag hervez spered ar re goz ? »

Troet e oa an oll gand Lemenig, hag an Ao. C... a reas eur skoulm war e deod goude-ze. Hogen pa azezas Lemenig war e gador, unan en e gichenn a lavaras dezañ :

« C'hwi a vezo on impalaer. »

Lemenig en em zistroas da weloud hag-eñ ne oa ket an den-mañ eur goapaer, med pa welas piou e oa, e kredas da vad e komze an den-ze hervez e skiant-reiz.

An nozvez-mañ a dlee kloza war eun dra meurbed estlammuz. Meur a Vreizad beo a zo gouest da rei testeni ez eo gwir penn-da-benn pezh a zo disklêriet amañ war-lerh.

Goude ar banvez e oe pedet eun ugent bennag a dud, aotrounez hag itronezed, gand *Ti Kaniri Breiz* da zond d'e va eun hanafad Champagn en *Ostaliri an Tri Beul*.

Ar vodadenn a oa greet en eur zal vraz, e penn all euz ar porz, 'leh n'halle den dond da drubuilla.

Ar gomz a redas diwar-benn eur plah yaouank mud, euz ar Releg, a oa brud diouti, er mare-ze, er helaouennou. Ar plah-mañ, keid ma oa o vesa he saout, a oa bet rentet ar gomz dezi gand eur paotr koz, gwenn e vleo, dizanvet ganti, hag eet kuit, raktal, heb lezel na roudou na doare er vro.

« Hennez, eme unan bennag, ez eo marteze salver Breiz. »

Ne oa ket e her peurechuet ma oe klevet eur pezh taol war eur prenest hag ar werenn a gouezas a-dammou er zal.

War-dro hanternoz e oa neuze, ha ne oa den er porz. Batet e oa an oll ; pep hini a grene, kalz pe nebeud. Ha setu an Aotrou Nicol, eil-mêr Lezneven, den fentuz, da lavaroud, d'e dro, eun draig all bennag ha da houlen eun asant all. Raktal e kouezas eun taol nevez war ar prenest all. Hogen ar wech-mañ ne oe ket torret ar werenn. Unan bennag a lammas euz ar zal er porz e leh ne gavas den, ha 'leh ne glevas trouz ebed.

Ano Yann ar Fusteg a oe lavaret adarre a vouez kuzet, e-touez an dud vodet, med Lemenig ne reas van ebed, hervez e hiz.

⁴ Ecce homo : latin : Setu amañ an den ! (bet lavaret da Boñs-Pilat pa oa bet diskouezet ar Hist dezañ.

An deiz war-lerh, a oa ar gwener, Lemenig a hoantaas prena eur walenn-viz eured a hiz koz hag en arhant, gand eur galon gurunennet war he fenn. Eun den yaouank euz an Naoned a gasas anezañ d'eur zal a zigore he dor war dachenn gêr, hag eno Lemenig a brenas eur walenn hervez e hoant, hag en tu-hont, eur stagadenn vantell en arhant.

EN ORIENT. Ar zadorn da noz, Lemenig a erruas en Orient, gand eur barz all bennag evid beza e goueliou Brizeug an deiz war-lerh. Ar barz Taldir Ab Hernin a oa e-touez ar varzed-mañ. Aliez en-devoa pedet Lemenig da zond da Garnoed da dremen eun nebeud deziou e ti e dud.

« Ar wech-mañ ez in, asur », eme Lemenig.

Al lun da noz, goude goueliou Brizeug, Lemenig a oa pedet da vond d'eur vodadenn greet er Helh Katolik ; ha mond a reas. Goulennet e oe digantañ ober eur brezegenn.

Ha setu-eñ o komz diwar-benn Bretoned Pariz, droug-komzet dioute aliez e Breiz, ha greet deze dismegañs a-wechou.

Pa oe echu ar brezegenn, eur beleg a zavas hag a lavaras :

« Pa he-deus ar vro renerien evel ar re hoh-eus klevet henoz, ez eo dleet deze sevel he halon ha gortoz he silvidigez heb aon. »

An oll a asantas. Ha setu tri, eme Lemenig ennañ e-unan, 'n eur zoñjal en degoueziou Lezneven.

Ar beleg-mañ a zo bremañ eskob.

Ar meurz mintin, ar barz Taldir a grogas e breh Lemenig :

« Da Garnoed, bremañ ! »

« Deom 'ta ! », eme Lemenig.

Da bemp eur d'abardaez ez errujont e ti an Aotrou Faffrennou, noter, eun ti koant ha peohuz a zeblante mousc'hoarzin ouz ar re oll a zelle outañ, eun ti a zegemer mad hervez ar hiz koz, renet gand eur Vretonez speredeg, desket kaer, ha barzez euz an dibab, an Itron Jaffrennou, mamm D/Taldir.

Lemenig a oa o vond da houzoud evid petra e oa bet kaset da Garnoed c'hweh vloaz ha tregont a-raog.

Priedelez gand Breiz

Ar merher mintin, ar barz Taldir a lavaras :

« Ar beure-mañ, mar plij ganeoh, ez aim d'ober eur valeadenn beteg Tosenn Sant Gweltaz. Prenet em-eus eur vombard en Orient ha c'hoant am-eus da hweza enni du-hont war lein ar menez. »

« Ma ! deom 'ta neuze », eme Lemenig. Laouen e vezin oh adweloud al leh kaer-ze. »

E zorn a hoarie dalhmad gand gwalenn Lezneven, rag houmañ ne chome ket war e viz en despet d'e hoant da zougen anezi.

« Re vraz ez eo ar walenn-viz-mañ, a zoñje. E Pariz, e lakin moannaad anezi. Neuze e chomo. »

Hogen ne ree van ebed euz ar stagadenn-vantell prenet a-gevred gand ar walenn.

Setu eta Lemenig hag ar barz yaouank en hent. Eur pennad goude e tremenent dirag chapel goant Sant Gweltaz, kuzet en he hoad dero ; hag int da zevel ar hra.

Lemenig a zellas gand evez ar helhiou toullet en douar, en eur glask en e spered gand piou e helle beza greet al labour-mañ : heman 'zo eul leh a vodadenn vraz a dud evid lidou pe evid eun dra pouezusoh c'hoaz marteze.

'N em gavoud a rejont war gribenn ar menez hag ar barz Taldir a anveze da Lemenig ar menezioù all hag an oll vroioù gwelet ahane. Eur wech greet an dro, Lemenig a yeas da azeza

e-barz an toull kreiz, greet evel toull eur peul divent. Ar hreiz a oa leun a vein. Taldir, azezet a-dreñv e gein, war lein ar hleuz, en em lakaas da hoari war e vombard hag e tenne diouti ton kaer *Bro Goz va Zadou*.

E-keit-se, Lemenig a zispenne ar bern mein. Med red e oa dezañ ehana eur wech bennag evid harz ar walenn-viz da goueza.

« O ! eme ar barz Taldir, echu gantañ e zonadenn, kaer az-pezo klask, ne gavfes netra en toull-ze. Klasket ez eus bet ennañ pell a zo. »

Ha Lemenig da zoñjal, rag e spered a boueze buan pep ger ha pep tra :

« Marteze ‘ta n’ez on ket deut amañ da gerhad, med kentoh da zegas eun dra bennag.»

Hag eul luhedenn a dremenas raktal en e spered. Kerkent e lezas e walenn-viz da goueza e-kreiz ar mein, en donder an toull.

Hag e-keitse Taldir a zone hardisa m ‘halle war e vombard :

« Sav, Breiz-Izel, d’an neh da Vannelieou. »

« Ma ! eme Lemenig dezañ e-unan, setu-me eureujet da vad gand Breiz en dro-mañ. Setu perag e prenis ar walenn e Lezneven. Ar barz mad-mañ, heb gouzoud dezañ, en-deus sonet evid rei gloar hag enor d’an eured. »

E-pad pemp bloaz Lemenig ne lavaras ger ebed a gement-mañ da zen.

An eured estlammuz-se a oe greet ar 16 a viz Gwengolo 1903. An Heol a verke 10 eur war gelh divent an oabl.

Lemenig hag ar Broiou Keltieg

Esitedfod Kaerdiz

Abaoe donedigez ar Vretoned a Vreiz-Veur d’an Arvor, a zo bremañ Breiz-Izel, da lavaroud ez eo abaoe pemzeg kant vloaz, meur a emweladenn a zo bet etre Breiziz Vreiz-Izel ha Breiz Bro-Geumri. En em anavezoud o-deus greet eta evel breudeur, rannet o broiou gand ar mor.

Er bloaz 1837, Hersart a Gervarker a oa eet da Vro-Geumri gand eun nebeud tudjentil a Vreiz-Izel. Chomet ez eus brud kaer a Eisteddfod Abergavenny.

Tregont vloaz goude, en 1867, ar Gemroiz hag eur Gall bennag, a Vreiz-Veur hag a Iwerzon, a rentas an emweladenn en eur zond da gendalh Sant-Brieg.

Ne oe greet emweladenn all ebed gand lidou beteg ar bloaz 1899. Hogen er bloaz-se, gras d’an Tad Hayde, da “Corchfarf”, da Fanteg ha da Jaffrennou dreist-oll, eun emgleo a oe greet etre Keumroiz ha Bretoned evdi kas eun nebeud euz ar re-mañ da weloud o breudeur a Vreiz-Veur.

Er mare-mañ, Lemenig a oa krog, abaoe daou vloaz, da skriva euz e du da Vro-Geumri, ha pa oa erru ar houlz, eur barz a Gaerdiz a zeuas da Bariz da bedi anezañ da zond da lidou barzeg ha d’an Eisteddfod, divizet da veza greet an 19 a viz Gouere, e Kaerdiz.

Lemenig en em glevas raktal gand Bretoned a Bariz ha gand Bretoned a Vreiz-Izel evid sevel eur strollad kannaded.

Gand asant ar re-mañ ez eas da Gaerdiz, azaleg deiziou kenta ar miz, evid studia ar vro hag evid aoza, evid ar gwella, an degemer a oa c’hoant d’ober d’ar Vretoned.

Gand pegement a garantez e oe degemeret eñ e-unan, dreist-oll gand an Arouezvarz Arlunydd Penygarn, gand Cochfarf an douger kleze ha gand an Tad Hayde, person Sant Peter ! An oll varzed a heuillas ar skwer ha setu Lemenig o kavoud, dre-oll, en-dro dezañ, kalonou birvidig ha gouest da barea pep tra hervez e hoant.

An dudjentil, koulz hag an dud a stad izel, a ree euz o gwella evid rei levenez d’ar hannad breton, kement ha ken bihan ken e soñje Lemenig :

« Biskoaz 'n em buhez n'em-eus tañvaet eul levenez evel houmañ. N'ez on ket souezet mar kleven ennon va-unan, abaoe va bugaleach, eur halvadenn o tond a-Vreiz-Veur, galvadenn ar garantez an hini e oa. »

E kastell Llanover, 'leh ma oa bet degemeret ar Vretoned 62 vloaz a-raog, gand Gwenanenn Gwent, an Itron Herbert, he merh, a roas dezañ ivez eun degemer euz an enorusa. Chom a reas zoken eur miz eno, goude al lidou gand Frañsez Vallée, evid studia al levriou koz, koulz hag an dud hag ar vro. – Er bloavez 1913, Kaedvoulc'h eet da Eisteddfod Abergavenny, a yeas d'ober eur perhirinerez⁵ da Llanover, bleniet gand Sir Ivor Herbet, hag e oe diskouezet dezañ kambr Lemenig hag al levrgell⁶ vihan 'leh ma laboure bemdez. Eur vatez koz, oajet a dremen pevar-ugent vloaz, a zeuas an dour war he daoulagad pa glevas komz euz Lemenig.

Lemenig eta a aoze pep tra evid donedigez Bretoned an Douar Braz, ha p'erruas ar re-mañ e Kaerdiz, pedennou a hortoze aneze oll evid dond da veza degemeret difrêz e tier aotrounez Kêr-Veur Bro-Geumri.

Al lidou a oa bet reizet gand an Arouezvarz ha gand Lemenig penn-da-benn evid rei mad da houzoud d'ar Vretoned dre beleh mond ha dond. Ha setu, pa ziskennas ar re-mañ diouz an hent-houarn, eur bern braz a dud a oa o hortoz aneze dindan renadurez ar Varzed. Ar Vretoend a glevas eno, dindan bannielou Breiz, o nijal 'uz deze, prezegenno euz ar haerra.

Lemenig en-devoa en e spered eur mennoz kaer. Goulenn a reas digand Bretoned an Diou-Vreiz hag-eñ ne vije ket mad ober evel gwechall, lid ar Hleze rannet. An oll a asantas gand joa, nemed eur hannad hepken. Al lid-mañ a zo bet krouet evid derhel an eñvor a gement-mañ : Pa oe rannet broadelez ar Vretoned koz, pep kostezenn a hoantaas c'hoaz kaoud an digarez da genunani o herentiez pa zegouezje gante en em gavoud war vor pe war zouar. Hanteri a rejont eur hleze : eun hanter a chomas e Breiz-Veur, eun hanter all a yeas gand poblerien Vreiz-Izel. Hag abaoe an amzer goz-se, pa 'n em gave pennou braz an diou vro da veza unanet, pep tu a zispake e hanter gleze hag an diou hanterenn a veze unanet, hag an unaniez-mañ a bade keit ha ma pade an emlewadenn etre tud an diou vroad.

Setu eta greet, war houlen Lemenig, diou hanterenn gleze evid ober, e Kaerdiz, al lid arouezuz-mañ.

Lidou Kaerdiz a oe meurbed kaer hag a badas eiz deiz. Hogen petra 'ree Lemenig er mare-mañ ? Kinniget e oe dezañ enoriou braz e-pad ar zizunvez, med eñ a zinahas dalhmad degemeroud aneze.

« Grit enor da hen-ha-hen ; lakit pep kannad da veza laouen. Me am-eus a-walh d'ober oh evesaad urz ar goueliou, evid peza zell euz va hostezenn. »

Ha n'asantas ket beza diskouezet evel eun den dilennet da gutuill enoriou diwar-goust ar re all. An traou a yeas eta mad-tre e-pad ar zizunvez. Ha Lemenig a oa laouen, rag beza eno c'hoaz, e tu-hont da Vretoned Breiz-Veur, Amerikaned, Iwerzoniz, Skosed, Kerneviz Breiz-Veur ha kalz a Zaozon ivez. Hag an oll dud-mañ e plijas meurbed deze ar Vretoned gand o gwiskamañchou ken koant ha gand o hustumou heb ardou.

Savidigez Gorsez Breiz

-Petra ez eo ar Barz ?

-Ar barz a zo eu Helt emskianteg ha

galvet.

Lemenig.

⁵ perhirinerez : pelerinach.

⁶ levrgell levraoueg.

Abaoe ma studie war vuhez ar Gelted, Lemenig a wele pegen talvouduz ez eo bet, evid Bro-Geumri, kaoud eur Gorsedd Barzed a zalh ken stard gand spered ar Ouenn ha gand hengouniou ar vro. Mar gallfe Breiz-Izel kaoud ivez eur strollad barzed skianteg, a spered uhel ha diere, evel Barzed Bro-Geumri, daoust ha gwir spered ar Vretoned, e-leh beza distroet a Vreiz-Izel, ha distaget diouz an dlead breton, ne zeufe ket d'en em staga startoh oute ? Goude kemend a amzer, kollet evid Breiz, setu e vije gwelet mibien ar vro o tiskouez d'ar bed an daolenn euz ar vuhez virvidig hag euz ar spered dispar a zo enni.

Gouzoud a ree e vije moarvad tamallet d'ar varzed-se eun ober ken skianteg gand ar sperejou izel na welont er bed nemed poltik ha relijion. Gouzoud a ree e vije greet enebiez d'ar varzed gand ar re, a-zehou hag a-gleiz, a zo gouarnet gand eur spered eneb-keltieg. N'eus forz, ar wirionez, hervez e gredenn, a dlee trehi d'an diwez, pa vije deut ar Varzed da gaoud eur gwir spered barzeg ha d'anaoud, reiz-mad, Gwir ar Ouenn ha mad ar Vro. A-raog eta !

Bremañ, pa oa greet Barzed a enor, dre asanti d'e houlen, gand ar Vretoned a oa eet da Gêrdiz, ne vije ket diêz dezañ ober eun dibab etreze, kemer ar re o-devoa eur spered keltieg, hag urza an traou evel ma vijed dleet evid sevel eur Gorsedd nevez ha distag e Breiz-Izel.

Hogen n'halle koulskoude seveni kement-se nemed gand aotreadur Gorsedd Ynys Prydain – ar Vamm Horsedd, evel ma veza lavaret du-hont – Ober a reas eta eun emgleo, gand Arouezvarz Keumri, war an aroueziou ha war al lezennou da rei d'ar Gorsedd-mab (e Keumri ar ger Gorsedd a zo gwregel).

P'erruas Lemenig er gêr, e oa gouest da lakaad war-zao Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel. Skoazellet evel ma oa gand ar Varzed Abherve ha Taldir, Lemenig a welas an traou o vond buannoh zoken eged n'en-devoa kredet, rag hast a oa e Breiz-Izel d'ober ar henta lidou barzeg.

Gorsedd Barzed Gourenez Breiz-Izel en em gavas krouet, e Gwengamp, e miz Gwengolo 1900, gand Aotreadur Gorsedd Ynys Prydain. Lemenig, war e houlen, a oe anvet Drouiz-Meur.

Ar bloaz war-lerh ne oe bodadenn bobleg etre ar Varzed. E 1902 e oe greet, e Karnag, ar vodadenn genta, dindan lagad an deiz ; degemeret e oe izili nevez. Ar vodadenn-mañ a oa renet gand Taldir.

E 1903, Lemenig a renas al lidou e Plouneour-Trêz hag e Brignogan. Al lidou-mañ a zeuas da vad e-tu-hont da vennoz Lemenig, ken e kavas, zoken, e oa gouest ar Gorsedd da gerzed heptañ en e benn. Eun nebeud miziou goude e kasas e ziskarg d'an Arouezvarz Taldir hag an Drouiz Alc'houeder-Treger a oe anvet Drouiz Meur, kemeret gantañ eun ano nevez : “Kaledvoulc’h”.

Bodaden Dulenn

Lemenig a vevas goude-ze eur vuhez kuzet. Med red eo din c'hoaz distrei eun tammig war a-dreñv evid komz euz ar vodadenn dalvouduz dalhet en Iwerzon en diwez miz Eost 1901. Kêr-Veur Dulenn a oa bet dilennet evid ober enni an emweladenn etre kannaded an oll Gelted, dastumet, ar wech-mañ, da ober anaoudegez vad hag evid en em glevoud war reolennoù an unvaniez kletieg.

Lemenig a oa eno pa zigoras al lidou. Ar re-mañ a dlee beza kaer meurbed. Gweloud a reas Bretoned ha Skosed gand o gwiskamañchou broaduz, itronezed Keumri gand togou uhel, broziou ha tavañjeriou sklêr, hag ar varzed gand o zaeiou.

Ar gudenn-dud a oa dastumet en ti-kêr en-dro d'ar mêr ha d'e wazed, gwisket hag harnezet, hervez giz koz ar vro, gand mezer sklêr hag alaouret. Ahane ar gudenn a yeas dre ar ruiou, bannielou ha sonerien en he hreiz, ha diwallet gand gwardou kaer, war varh ha war droad, da gaoud Ti ar Vodadeg e penn all ar Gêr-Veur.

An arglouiz⁷ Kasteltown, a goz noblañs ar vro, a urzas pep tra a-du gand an aotrou Fournier d'Albe. Lemenig, bete vremañ, n'en-devoa bet netra d'ober : hogen erru 'oa e dro.

Eur mênhir a oe douget e-kreiz ar prosesion hag ar mênhir-mañ a oa rannet e pemp lodenn hag ar pemp lodenn a oa arouez ar Pemp Pobl keltieg. Al lodennou a dlee beza unanet e-kreiz ar vodadenn, dindan an ano a *Lia Keneil*.

Azaleg erru an dud e Ti ar Vodadeg, setu eta lakeet al Liz Keneil el leh a enor, e-kreiz ar zal vraz, hag an oll Gelted dastumet tro-ha-tro. Ha setu kanerez ha setu sonerez war an telennou, ar haerra ma hallfed klevoud ; ha setu ivez displeget prezegennoù entanet diwarbenn ar vreudeuriez azliammet goude kemend a gantvejou. Tridal a ree an oll galonou hag an daerou a levez a strinke a zaoulagad pep hini. Kaerad bodadenn e oe houmañ evid Breiz-Izel hag evid an oll vroioù keltieg !

Hogen Lemenig a gave e oa dienez euz eun dra bennag el lidou-mañ. N'halle ket distrei e zaoulagad diwar ar paour-kêz Lia Keneil, a oa e-kreiz ar zal, ha ne ree den ebed ken van outañ.

Setu-eñ eta, goude al lidou, o vond da gaoud an Arglouiz Kasteltown ha da lavaroud dezañ :

« Med 'gred eh eus eun dra bennag a dalvouduz d'ober c'hoaz gand al Lia Keneil pa'h eus kemeret kemend a boan din d'hen degas amañ. »

An Aotrou Kasteldown ne lavaras ger ; med goude beza sellet ouz Lemenig, e halvas e skriver, ha pa oa erru hemañ e tistroas war-zu Lemenig hag a lavaras :

« Ne welan ket petra 'vefe c'hoaz d'ober gand ar mênhir nemed eun test euz al lidou bet greet hirie. Ha c'hwi ?, emezañ d'e skriver. »

« Ne me kennebeud », eme an den yaouank.

« Ha c'hwi ? », eme an Ao. Kasteltown da Lemenig.

« Ya, eun dra hag a blijo deoh, zoken, a gredan, eme Lemenig ; rag gwelloc'h eged ne vern petra, e tiskouezo d'an oll gwir abeg or bodadenn. Setu anezañ : Evid lidou an abardaez, e refet prena lietennou seiz pers, glaz ha gwenn da lakaad en-dro d'al Lia Keneil, ha pa vefom oll dastumet adarre en-dro dezañ, e lavarfet d'ar pemp pobl bodet ez eo erru an eur d'ober etreze eul LE a unvaniez peurbaduz. Hag e pedfet eun den a beb bro da zond da lakaad e zorn war ar MÊN bihan ha d'ober, pep hini d'e dro, eul Le a unvaniez. »

An daou Iwerzonad a oe eüruz o klevoud ar mennoz-mañ hag an Ao. Kasteldown a drugarekaas Lemenig a-greiz-kalon. Lemerig ne oa ket c'hoaz lesanvet LEMENIG, med hebdale e vezo hemañ e lesano.

Lemenig

D'an abardaez, pa oe dastumet ar Gelted e zal, goude an digorion, ar prezegennoù, ar sonadennoù, setu an Ao. Kasteltown o tisplega evid petra e oe bet pedet an oll Gelted da zond da Zulenn. Hag eñ da zsikouez al Lia Keneil ha da bedi eur hannad a beb bro da zond d'ober war ar mên eul le a unvaniez peurbaduz. A oll a zavas gand eul levez a-leiz kalon ; an daouarn a strakas ha pep hini da youhal, herta ma helle : Brao ! brao ! greom al le ! greom al le !

Pa oe greet ar peoh, an Ao. Kasteltown a halvas da genta Lemenig da zond, evel kannad Breiz-Izel, d'ober e le. Hag eun all a beb bro a bedas ivez. Ha setu-int o-femp en-dro d'al Lia Keneil.

⁷ arglouiz : ?

« Ha bremañ, eme an Ao. Kasteltown, mar deo youl ar Gelted dastumet amañ, pedet oh d'ober al LE a unvaniez peurbaduz war ar mênhir. C'hwi, aotrou, emezañ da Lemerig, a gentelio evid ho pro. »

An oll Gelted a oa en o zao. Klevet ho-pije eur gelienenn o nijal er zal pa lakaas ar pemp Kelt dilennet o dorn war ar mênhir, ken brao kempennet bremañ gand al lietennou seiz tri liou.

Lemenig a zavas e vouez :

« En ano Breiz-Izel, emezañ, hag an oll Vretoned, e ran al Le a unvaniez gand an Oll Gelted hag eh hetan ma pado an Unvaniez-mañ keit ha ma vezo euz ar bed. »

Ar pevar all, war e lerh, a reas ivez eul le e-kreiz al levnez olleg hag ar strakadennou daouarn.

Lemenig en-devoa gounezet e ano a Lemenig, an ano bet lakaet war-raog gand an Diouganer. Greet en-devoa al LE war ar MÊNIG⁸.

⁸ ar MÊNIG : Notenn gand an oberour : El levr *An introduction in Early Welsh*, gand John Starchon, ez eus menez, en hanez Arzur, tennet euz *Leor Ruz Hergest*, euz Kador Llemenig, hag er geriadur e kaver : Llemenig : *striding, bounding. Starling* a dalvez : a ya war-raog a-gammedou hir.

Bounding a dalvez : a ya a-lamm. Ar geriou-ze a zo troidigez kenta ha dre-ze an hini wirra.

Bez' ez eus eun all, yaouankoh, moravad, hag a dro Llemenig gand *salas*. Kavoud a reer anezi e Chrestomatie bretonne an Ao. Loth, p. 93 ; med geriadur an diwez, p. 494, a ro ivez lemenig = *sautillant*.

Kredi a reom eta e heller trei Lemenig gand : “an hini a ya war-raog a-gammedou hir, al lammer“.

Ar Spered

Bretagne, c'est de toi que viendra le salut.

Y.B.

Breiz-Veur ha Bro-Hall

An Emgleo Kaloneg

Oll labouriou Lemenig n'int ket anavezet, siwaz ! Med ar mad greet gantañ en-deus douget frouez.

Lemenig a zo bet unan euz kenta oberourien an Emgleo Kaloneg etre Breiz-Veur ha Bro-Hall, an hini kenta, zoken, a hellan lavaroud. E dad-kaer, an Ao. Edouard Krug, a oa o chom e niverenn 11 ar Bali C..., e Pariz. An ti-mañ a oa d'an Aotrou V..., tad-kaer an Aotrou D..., den politik, hag a chome ivez eno. Bez' e oa c'hoaz, en estajou all an ti, liverien all : an aotrounez Feyen-Perrin, Lapostolet, Eug. Feyen. An Ao. Krug a zalhe eun "Académie" gand an Ao. Henner. Lemenig, hag an Ao. D... a reas anaoudegez abred, an eil gand egile, e ti an Ao. Krug hag e ti an Ao. Feyen-Perrin, 'leh ma veze bodadennoù ijinerien-gaer ha tud politik. Gwelet e veze eno ar Jeneral Thibaudin, Waldeck-Rousseau, ar Jeneral Boulanger, an Doktor Liouville, kenta pried an Itron W. R..., ar priñs Stirbeck, ha meur a hini all.

Aliez e tegouezas da Lemenig komz gand renerien bolitik ar vro ; aliesoh c'hoaz e tegouezas dezañ komz, etre pevar lagad, gand an Ao. D... hag e reas da hemañ selaou e vennoziou ketltieg. 'N em gavoud a reas abred an Ao. D... a-du gantañ war pezh a zelle an unvaniezh a oa mad ober etre Breiz-Veur ha Bro-Hall, diou vro e leh ma'z eus poblou keltieg dreist-oll, da lavaroud eo tud a heveleb gouenn, gouest da 'n em glevoud etreze.

P'erruas taol Fachoda, er bloavezh 1900, Lemenig a ziskouezas d'an Ao. D..., pegen euzuz e vije stad Vro-Hall keit ha ma talhje homañ da enebi ouz Bro-Zaoz. En tu-hont, me 'gred en-devoa Lemenig eun aotreadur bennag a Vreiz-Veur evid lakaad ar gaozeadenn da gregi war an danvez-mañ : mar ez eus soñj, eisteddfod Kêrdiz a oe greet ar bloaz a-raog. Darempredet en-deus beteg e varo gand diou itron vraz a Vro-Zaoz (heb komz euz re-Geumri) : an itronezed-mañ a oa sperejou euz ar haerra. Kalz a garantez ha kalz a zoujañs a zo bet diskouezet euz an daou du e-kerz an darempredou-mañ ha kalz a onestiz ivez.

Onestiz Lemenig

Lavaroud a rin c'hoaz ez eo marvet Lemenig en eur stad ezommeg. – Ne lavaran ket evel eur paour, peogwir e oa e di leun a livadennoù hag a arrebeuri a dalvoudegez - evel eun den ha ne glaskas biskoaz an tu da hounid arhant gand itrikou fall. Gand dienez arhant ez eo bet stourmet aliez da helloud mond da weloud e vro garet ha da gemer ar gomz e bodadennoù ar Vreiziz, dreist-oll e-pad bloaveziou diweza e vuhez.

Maro an Ao. Krug, c'hoarvezet er bloaz 1901, a oa bet eur holl braz evid tiegez Lemerig.

Koulskoude, Lemerig hag e wreg a gavas an tu d'ober, gwech an amzer, degemer mad d'ar Vretoned en o zi, ti kempennet ken kaer gand oberou an Ao. Krug ha gand re an itron Mari ar Fusteg.

Med red eo din lavaroud – peogwir ez on bet test war euriou diweza Lemerig, koulz ha war bloaveziou diweza e vuhez – e oa ken braz an dienez en e di ken ne vije ket bet zoken peadra da baea e zouaridigez paneved e oa roet d'e wreg paour ar 500 lur a zo dleet gand kevredigez tud implijet en Ti-kêr evid sikour douari peb ezel maro.

Goude maro he fried, an Itron ar Fusteg a yeas da chom da “Beaumont en Auge“, e Normañdi, ‘leh m’he-devoa eun ti hag eul liorz, herez he zud-koz. Eno e varvas er bloaz war-lerh heb lezel eur gwenneg, roet ganti he zra en he beo.

Meur a Hall a denn gloar hag enor euz an Emgleo Gall-Saoz, sinet er bloaz 1904, ha ne oar ket eo bet reñket an traou gand eur Helt bennag dizanvezet. An hini a heñchas da genta ar mennoz kaer-mañ a zo chomet, evel e meur a zegouez all, en donder e izelder, didrouz ha joaüz, greet gantañ e zlead keltieg, ha paeet hepken gand testeni e emzkiant.

Skwer buhez Lemenig

Oll d’an oll ha d’e vro

Dreist-oll en-deus gwelet al lenner ez eo chomet paour Lemenig e-pad e vuhez hag ez eo bet merket e baourentez gand an degoueziou a lakaas anezi da veza anzavet gand an oll. E Gwengamp, pa gouezas ar gwalleur war e dud, ez ee d’ar skol hanter-wisket hag aliez gand an naon. Stad e dud a oa ken kriz hag e hini. Eur wech bennag, evid dizamma ar re-mañ, o herent diwar ar mêz a bede ar paotr yaouank da zond da dremen eun nebeud deizioù en o mereuri pe ‘n o milin. Amzer vad a veze neuze evid e gorr : hogen kaletoh amzer a oa red dezañ kaoud. Red ‘oa dezañ gouzañv ar brasa ezommou evid anavezoud mad ar bed hag evid beza gouest diwezatoh da houzañv peleh ema an droug ha peleh ema ar mad.

Gand e vamm ha gantañ ez eus eta c’hoarvezet pezh a oa dleet : paourentez kriz ha merket avad da veza anavezet en-dro deze. Eur wech diskennet er stad a zervijourez, e vamm, na den all, n’hallent dislavaroud an diskenn. Eur wech erru e Pariz, euz a Boñdi, argaset gand an ezomm beteg beza paket gand gwadourien gêr, Lemenig n’halle ken dianzavoud krizder e houzañv.

Bet en-deus eta da enebi ouz ar wasa stad, ha red e oa dezañ trehi ken na vije deut da veza anzavet, hag anzavet gand an dud vraz, evel eun den a spered uhel ha dispar. War ar poent-mañ e vije meur a dra da lavaroud ha degoueziou souezuz da zisklêria c’hoaz. Lemenig en-deus kuzet aneze muia ma ‘n-deus gallet, mez bez’ez eus tud a stad uhel hag a hallfe rei testeni euz ar homzou hag euz an oberou o-deus diskouezet sklêr-mad pegen uhel e oa savet e spered a-uz d’e stad a zienez. Pezh ne gavas biskoaz ez eo ar binvidigez. Eüruz an hini a guita ar bed, distag diouz e vadou !

Paourentez, stourm ha treh : setu eun driadenn hag a zell outañ – unan, war eun tu euz e vuhez. Pellaet diouz ar gounidegeziou braz, tremenet ez eo evel eun den diskiant dirag an dud n’int stouet nemed dirag an arhant. Dirag an dud, a oe red-mad deze anzavoud uhelder e spered, ez eo ivez tremenet evel eun den ha ne raje netra gand e spered kaer dre ma oa heb arhant ha dre ma n’houlle ket hen gounid o lakaad e enor dindan e dreid.

En tu all euz e vuhez ema Breiz hag ar Gelted. Amañ avad, eur wech krog gand e ober, Lemenig en-deus hen meret evel ma plije gantañ e-unan. Marteze ez eus degouezet gantañ souezi eur Breizad bennag, gwech ha gwech all, dre ne lamme ket war ar gounidegeziou evitañ e-unan ha dre ne ree ket an trouz en-dije gallet ober en-dro d’e ano.

Mar deus unan bennag hag en-deus bet kasoni outañ, n’ez eo ket asur abalamour d’eun droug bennag greet dezañ gand Lemenig. Bet ez eo dreist-oll eun den a labour hag a beoh, troet d’ober ar mad en-dro dezañ ha d’ober plijadur d’e genvroiz da genta. Marteze, evel m’ema an darvoud, ez eo bet madelezuz e-keñver ar re o-deus diskouezet outañ eun tammig kasoni, pe gentoh eun tamm yenienn. Me ‘gred n’ez eo ket bet roet dezañ e wir gand an oll. Med ken bihan ez eo bet niver e zleourien diwirion, ken ne reas van ebed.

Meur a hini en-deus bet lod euz oberou mad Lemenig heb gouzoud piou e oa o madoberour. Biskoaz Lemenig ne hoantaas tenna lorr euz e vadelez.

‘N em gaoud a reas eur bloaz e Breiz, e-pad eun devez hañv, e presbitor Tredrez, gand eur bagad beleien. E-touez ar re-mañ e oa unan a spered uhel, leun e galon a garantez-vro hag a blijas dreist-oll da Lemenig. Hemañ n’ankouezas ket an devez kaer en-devoa tremenet e Tredrez. Eun dro bennag en em gavas er Frañs eun eskopti heb eskob. Piou a vezo eskob nevez ? An hini a oe dibabet gand ar gouarnamant, a oe ar beleg breizad a blijas kement da Lemenig e Tredrez. Med biskoaz an eskob breizad n’en-deus gouvezet e labouras Lemenig evitañ.

E oberou e Breiz-Izel, e Breiz-Veur hag en Iwerzou a zo deut da vad. An tu-mañ euz e vuhez en-deus eta kompezet tu ar gwalleur, rag e peb darvoud ez eo bet treh d’e ober evid mad Breiz hag hini ar spered keltieg. Kement-se a zo bet anzavet gand kement hini a zaludas anezañ evel eur spered dispar hag aliez evel eur pennrener.

Hervez lavar eur Breizad mad a Lezvenen, en 1903, Lemenig a oa eur galon greñv ha tener. Tener ez eo bet evid karoud e vro, ha kreñv ez eo bet dirag heh enebourien ha dirag enebourien or gouenn.

Meur a lenner a vezo marteze souezet o weloud Lemenig o kroui kevredigeziou, o labourad evid o hennerzi hag oh en em zistaga dioute pa vezent gouest da gerzed i o-unan. Soñjal a reont : setu amañ eun den ha ne chom er hevredigeziou nemed e-pad an amzer a boan. Erru ar mare da vedi, e teh.

Hag ober a reas evel-se. Perag ? Lemenig en-devoa eun dlead a-uz d’ar re all : chom diere. Red e oa dezañ chom diere evid beza d’an oll. Abalamour da gement-mañ ne oe biskoaz gwelet ouz en em veska gand traou ar politik na gand re ar relijion, nag en em vounta en kevredigeziou skrivagnourien nag all. E spered a oa d’an oll, roet kalz muioh evid ar beorien eged evid an dud pinvidig.

« N’ez eo ket me, emezañ, am-eus aozet va buhez na troet anezi war an hent he-deus heuliet. Meur a wech em-eus enebet, gand va oll nerz, ouz an darvoudou a welen o tond. Meur a wech em-eus greet euz va gwella evid trei hent hag evid kemer an hent nevez a gasje ahanon, evel ar re all, d’ar binvidigez. Meur a wech em-eus soñjet e hallen c’hoaz, en tu-hont d’ar binvidigez, klask plijadureziou ar vuhez koulz hag ar re all. Meur a wech em-eus goulennet, diganin va-unan : Petore beli a harz ahanout da heuill kredennou ar re all, pe da gemer eur gredenn nevez e-mesk ar re a ziwan niveruz dre ar bed ? »

Meur a wech e soñjas ivez :

« Perag, p’am-eus greet eun êsa, pe eun all, pe evid gounid, pe evid plijaduri, pe evid kredi, pe evid oberi, perag e kavan peoh ha levenez pa vez distrujet va hoant, evel m’errue gand va mamm ivez ? »

Mouez ebed ne responte da Lemenig e-touez an dud, med marteze ‘uz dezañ eur spered bennag a hoarze dre ma oueze reiz-mad e oa red da Lemenig heuill e hent e-unan ha lezel ar re all pleustri o hini.

Dre forz mond en-devoa anzavet mad m’en-devoa netra d’ober a well er bed nemed labourad evid an dud peogwir ne deue da vad gantañ nemed pezh a ree evid ar re all. Eurvad a zo bet eta evel-se evid ar re o-deus eñ pleustret.

« Deut on da houzoud, emezañ, ne dlean ket miroud va spered evidon va-unan. Piou a oar ? mar em-bije bet eur binvidigez all bennag, dindan va dorn, maorvad, em-bije greet heveleb implij ganti. »

Red eo embann a-vouez uhel en-deus roet Lemenig gwella frouez e spered d’e vignoned, dreist-oll da ebestel an ober barzeg e Breiz-Izel, - e Bro-Geumri, zoken – heb goulenn an disterra tra na meuleudi.

Mennoz Lemenig war halvedigez Breiz

Dond a ra din meur a zoñj a gomzou uhel Lemenig diwar-benn galvedigez Breiz :

« Hervez va hredenn, eme Lemenig, Breiz-Izel a zo bet savet gand an Ollhalloudeg evid beza skoazell Bro-Hall en he brasa ha kriza ezommou. E-kerz ar brezel a Gant Vloaz etre Breiz-Veur ha Bro-Hall, ar Breizad Gwesklin en-deus harpet kaer ar Hallaoued 'eneb ar Zaozon, ha dindan renadur Charlez VII, eur Breizad all, Arzur Richmond, e-neus bountet ar re-mañ er-mêz a Vro-Hall goude emgann Formigny. Ar Hallaoued hag o levriou a zo mud war ober dispar Richmond hag a lavar ez eo Janedig Ark a garzas ar vro diouz ar Zaozon. Ar gaou a zo gante, rag Janedig Ark a lavare hi heh-unan e Reims : Diwezet ez eo va labour pa'm-eus lakaet ar gurunenn war benn Charlez VII. Ha setu c'hoaz eun testeni : Losket eo bet Janed Ark e Rouañ, ugent vloaz a-raog emgann Formigny. Gwir eo eta ez eo bet ar Vretoned salverien Vro-Hall er mare-ze ; med gortoz an anzav a gement-se a-berz ar Hallaoued ez eo koll on amzer. Hogen ar wirionez a zo ar wirionez hag an Hini en-devoa kaset ar Vreiziz a Vreiz-Veur da Vreiz-Izel en amzer-goz, Hennez ne vez ket faziet. »

Ha Lemenig a gendalhe :

« Diwezatoh pa oa deut Rouelez Bro-Hall da veza eur vez evid ar vro, ar Vretoned a grogas d'ober brezel dezi e Breiz-Izel hag o gwad a ruillas keit ha ma klaskent diskar beli ar Roue e Breiz. Ar stourm ne zaleas ket d'en em leda pelloh ; hag er bloaz 1789 setu e oe red d'ar Roue gervel kannaded ar Rannvroioù da zond da Bariz, da lakaad urz e leh ma oa an dizurz. Petra'reas ar Vretoned ? Kroui e Pariz ar gevredigez anvet ar Hlub Breton. Eno en em lakjont, gand kemend a galon, da brezegi ar Hallaoued war anaoudegez o gwiriou, war an heñchou heuliet a viskoaz gand ar Gelted, o zadou, ken e oe sklêrijennet sperejou ar Hallaoued. Ar Hlub Breton a zeuas da veza Klub ar Jakobined. Savet e oa ar Reveulzi vraz dre halloud ar Vretoned, hag ar Rouelez a yeas da goll.

Ne vez ket greet enor a gement-se d'ar Vretoned. An dud diskiant a heuill an aliou a zo o redeg dre ar bed, dalhmad 'eneb ar Vretoned. Hogen ar Vretoned desket hag emskianteg a oar peleh ema ar wirionez.

C'hoaz e tegouezo gand Breiz-Izel c'hoari war dachenn Vro-Hall. An oll a oar pegen dister ez erru stad ar bed : Sellit e kreh, sellit e traoñ, sellit a-zehou, sellit a-gleiz, ar bed a strak evel eun ti re goz, fraillet ar mogerioù anezañ :Kaer o-deus ar bolitikerien, ar romaniz⁹, an dud e-karg, an dud pinvidig ober euz o gwella evid touella ar bobl dister hag ar beorien war o stal, ema erru an diwez. Bremañ ez om dirag eun tremen evel n'ez eus bet hini abaoe 2.000 bloaz.

Dre gemenn an Ollhalloudeg, Breiz hag ar Vretoned a zo o vond da zével evid skoazelli Bro-Hall hag ar bed e-kreiz an darvoud spontuz-mañ. Nerz ha kalon a vezo red kaoud evid pleal gand eun ober ken divent ; med pa vezo sevenet heh amzer, Breiz a zegemero he gopr digand an Tad, hervez gwirionez he buhez hag heh oberou mad. »

Me a lavar deoh, Bretoned, mouez Lemenig a zo bet, en-digor an Amzer Nevez, mouez an Emskiant keltieg. Hekleo ar vouez-se a dle tregerni da virviken en emskiant Barzed Vreiz.

Lemenig, labourer ar sperejou

A-raog kregi gand e ober braz, Lemenig n'ez eo bet sklêrijennet war e stal nemed tamm-ha-tamm, deiz-ha-deiz. A beleh ez eo deut ar sklêrijenn dezañ ? N'ez eo ket a-berz an dud, rag den n'eo bet ken sklêrijennet hag eñ e-unan war an traou keltieg. Mar deo deut ar sklêrijenn-ze euz eun tu bennag, red eo kredi ez eo deut euz eul leh hag a zo uhelloh eged ar bed-mañ. Pa zonas an eur, youl ha spered Lemenig a heuillas an hent eeun. Biskoaz n'hallas distrei diwar an dlead.

⁹, ar romaniz : ?

« N'hallan mui soñjal, eme Lemenig, e oa dleet din senti ouz hen-ha-hen, nag ouz roue pe impalaer nag ouz kredenn ebed ; rag gouzoud a ran dreizon va-unan, n'ez eo stag an Ollhalloudeg nag ouz kredenn varvel nag ouz gouarnamant ebed. An Ollhalloudeg a zo tad d'an oll hag an oll dud a zo sellet gantañ evel e vugale. Eun urz vad ez eo eta lakaad unvaniez etre an oll dud. Hogen dre n'houll ket an dud nag unvaniez na breudeuriez, dreist-oll e Bro-Hall, kement-se marteze ne vezo ket sevenet gand komzou hepken. Degoueziou gwasoh a zo diouganet d'ar bed. Ar gwad a redo hag an tan a yudo war ar hêriou. Eur gwallamzer a vezo da dremen. »

Lemenig ne houlenas digand den a betore kredenn pe a betore tu e oa, na pe 'oa paour pe pinvidig. Evid an oll e oa e gomzou, hag an oll, goude beza selaouet anezañ, a oa gweloh a ze.

Stourmet e-neus evid ar gwir hepken hag evid ar wirionez.

« Ar wirionez, emezañ, n'ez eo ket klenket nag en yalh hemañ nag henez. Lugerni a ra en neñv, kement hag an heol, ha mui, evid pep hini. Evid gweled anezi n'ez eus ezomm nemed da zigeri daoulagad ar spered, e-leh degemer, evel eun dall, kredenn hemañ pe kredenn henez hag o-deus marhadourez da werza. »

N'ez eo ket savet Lemenig da vrezeli heb beza bet galvet ; ne oa ket deut da lakaad brezel heb ezomm, med da lakaad ar peoh e oa deut.

« Mar don, emezañ e diwez e vuhez, gwir den an diouganou, goude kalz a emgannou, kalz a zarvoudou spontuz, kalz a drubuillou, am-bezo degaset ganin ar spered a beoh. Ar re a vezo bet kelennet ganin e vezo gante an treh bepred. Lemenig a vezo en o hreiz, a spered, mui c'hoaz eged a gorv ha seul-vui e teuio o spered da ledannaad, seul-vui e vezo anavezet gante... »

« Erru om, eme Lemenig, en eur houlz 'leh ma'z a pep tra da goll : ar Galloud, ar Hredennou, an Urz. An traou-mañ n'int ket bet dalhet en broiou ar Zevenidigez abaoe 2.000 bloaz nemed dre veli an armou oh ober gaou ouz an dud, ouz o spered, ouz o labour. Diskaret eo bremañ ar Galloud, ha dre n'int ket ken skoazellet gantañ, ar Hredennou hag an Urz a ya da goll ivez. An Ollhalloudeg, mar lezfe an traou da vond er hiz-se, a lakafe en Deneliez da drei war-zu ar gouezder, hag an douar da veza preiz al laeron hag ar wasa torfetourien. Abaoe kant vloaz, dreist-oll, ema er bed sevenet o trei hag o tistrei war eul leur re vihan gand ar c'hoant d'he huitaad heb kaoud an tu d'hen ober. Gervel a ra sklêrijenn eur Zalver bennag. Hogen al lezenn a ren ar bed ez eo lezenn ar Welladurez. N'ez eo ket eta war a-dreñv e tle an dud mond ; kelennet em-eus d'ar Vreiziz hent ar Zilvidigez. »

Erruoud a raio eun amzer hag a vezo barnet labour barzeg Lemenig gand an oll Vreiziz. Neuze e vezo meulet e ano evel hini ar zalver a oa gortozet.

E henivelez, e vuhez, e zremm koulz hag an diouganou war an amzer ma tlee beva, hag a zo sevenet bremañ, e gwirionez, a ziskouez dim ez eo Lemenig an hini a zleom saludi, o soñjal ez eo an hini a zo bet galvet, abaoe pell amzer, gand on tadou-koz.

Anvit anezañ ar Roue Arzur, pe Lemenig, an heveleb hini a hall beza.

Gouzoud a ran ez eus meur a hini hag a lavar n'hall ket ar Roue Arzur adveva . Ar re-ze ne zoñjont nemed e korv marvel ar Roue Arzur ha war gement-se n'heller ket dislavaroud aneze, rag korv Arzur, evel korv marvel an dud all, a zo teuzet e-barz an douar hag en êr. Med e spered koulskoude, evel an oll sperejou, a zo beo hag a vezo beo da virviken.

Ha perag n'hallfe ket ar spered kaoud ar galloud, pe an aotreadur, da guitaad e stad a spered heb korv evid dond c'hoaz, e-mesk an dud da 'n em wellaad pe da ziskouez deze e garantez peurbaduz, pe da zevel aneze a-zindan yeo an estren ?

Er herz-se, piou a lavarfe n'hall ket ar Roue Arzur beza distroet e-touez ar Vreiziz ? Mar n'eo ket eun dra souezuz gweloud eur spered o tond eur wech war an douar, perag e vefe souezusoh gweloud eur spered, an hevelb hini, o tond diou wech, teir gwech, mil gwech ?

Meur a hini a houlenno petore skoazell a roio Lemenig d'ar bed. Kas anezañ war-raog etrezeg e welladur ? Kalz a dud a lavar kemend-all pa vezont o klask beza lakaet er hurzuillou pe er Gannadelez. Pehini aneze en-deus gwellaet ar bed ?

Komzet en-deus Lemenig d'e vignoned euz an traou a zo bremañ en brall hag a zo o vond da goueza. Galvet en-deus ar Spered da veza aotrou ar bed.

« Pa vezo kouezet an traou, eme Lemenig, e vezo red sevel traou all en o leh. Daoust hag-eñ e vezo ar galloud d'hen ober ? Kalz a dud a lavar en-deus ar Spered aotrouniez a-walh war ar bed azaleg bremañ, ha n'ez eus ezomm ebed da glask sevel ar Spered uhelloh. Me a respont : An neb a gav ez eo mestr a-walh ar spered, ar re-ze ne welont ket an traou war o daou du ; ne welont ket ez eus gwelloc'h implij d'ober gand ar Spered eged an hini a reont gantañ. Ar re-ze a blij gante klevoud ar vistri o lavaroud : « N'ez eus netra en tu all da bez a lavarom. » Dre ze n'ez ket a ezomm da gaoud kement-se a Spered. »

« Nag an hini a chom war ar ger-ze, divalo ha kousket, heb c'hoantaad anaoud netra anevéz, na diwar-benn o buhez o-unan, na diwar o spered pe o horv, pe o bro, pe o gouenn. Displijoud a ra deze gwellaad o homz, o stumm, evesaad o oberou ha studia evel m'ez eo dleet d'an den ober e-pad e vuhez. Ne lavaran ket studia war levriou, med studia war gement tra a dremen dirag on daoulagad. Ar gwas evite ez eo lezel o emskiant da vorgousked, an emskiant a zo bet roet deze evid sklêrijenni aneze war an droug ha war ar mad, ha da ziskouez deze o dlead en peb ober hag en pep komz.

Evid ar re-mañ ar Spered a zo bepred re aotrou. Hogen bez' ez eus eun darn all hag a gav ez eo re verr an hent heuliet gand ar Spered er bed-mañ. Abaoe kant vloaz, ar spered a zo bet troet war an ijinou, hag an oll wel ez eus bet implijet eur galloud dispar gand ar Spered, dreist-oll abaoe hanter-kant vloaz. Ma vije bet diskouezet d'ar spered eun hent all, perag n'endije ket kerzet gand mui a aket c'hoaz war an hent-mañ ? Pep tra a dle dond d'e goulz. Bremañ, dre m'eo bet kavet, evid ar poblou, an tu da 'n em anavezoud, bremañ pa ouzont peleh ema o breudeur war horre an douar, bremañ pa welont ez eus, e peb leh, mad ha fall, e peb bro, hag e pep stad, setu deut eur sklêrijenn da bara war o spered. Ha dre zikour an ijinou an hini ez eo deut ; rag ar re-mañ a lak an dud da vond war zouar ha war vor buannoh-buanna da 'n em veska, heb kasoni nag enebiez.

Koulskloude an oberou n'int ket c'hoaz dare da veza echu. Unan nevez a zo d'ober hag a roio d'rar sperejou trist ha naoneg, levenez ha boued. Nebeud a stago gantañ da genta, med tamm-ha-tamm e sach'o ar gwella sperejou hag ar re all a zeuio war-lerh. Ha pa vezo anavezet buhez Spered ar bed gand an oll, an oll a vezo war hent ar welladurez.

An ober-mañ a zo eun ober distag diouz ar re all ha ne vezo sevenet nemed goude ma vezo bet lakaet eun urz nevez er bed. Gand hemañ, en gwirionez, ez eo red kentelia, rag an dud a intento anezañ da vad.

Pez a zell ouz ar madou hag ouz ar gwiriou a zo sklêr bepred evid peb den, rag peb den en-deus sellou lemm evid pleal gante. Pa vezo gwelet ober lezennou gwirion da rei e wir da bep hini, ha da rei dezañ galloud da wellaad e stad ; pa vezo savet an urz peohuz e leh ma'z eus bet brezel beteg bremañ ; pa vezo gwelet ne zervijas ar brezeliou o-deus dizunanet ar bed, nemed da viroud galloud ar vistri, e-pad kemend a gantvejou, neuze en em stago ar bobl ouz al lezennou hag e tifenno aneze beteg ar maro. »

... « Penaoz e vezo cheñchet an traou ? Gwelet e vezo d'ar houlez merket gand an Tad da lakaad an toaz e go. Klevoud a reer dre oll an dud o klemm war an nevezentiou a weler o sevel bemdez. Setu labour ar go, ha war wasaad ez aio pe war wellaad, kentoh, hep paouez. »

Ar fornier ne oa ket pell. E ano a oa Lemenig.

Anavezet eo bremañ e Breiz-Izel pe tost da veza. Leh all ez eo bet anavezet ivez kalz pe nebeud. An deziou a-raog ma tistroas da Vro-Geumri, e 1899, eun tiad braz a dud a vlainsonas evitañ, hag a roas dezañ eur gurunenn deliou dero. Ne oe ket laret ouz petore ober e selle ar gurunenn-mañ. perag ? Evid lezel ganti heh oll mennoz arouezuz a gurunenn.

Eun Hadour : setu eta pezh ez eo bet Lemenig. Hadet en-deus ar spered barzeg en eur park keltieg. Ar henta eost medet a vezo hadet adarre, hag evel-se, dalhmad, beteg ma vezo goloet ar bed gand gwiniz ar spered barzeg.

Lemenig ha gouiziegez ar bed

Lemenig a zo bet an hini en-deus, en or mare-ni, hag abaoe pell amzer, anavezet ar gwella gouiziegez an Drouized koz.

Abaoe ar bloavezh 1895 pe war-dro, en-deus studiet dalhmad ar *Barddas* hag er studi-ze ez eo bet disklêriet dezañ ar mennoziou kaer a lakaas gwechall ar Gelted e penn uhell ar Zevenedigezh.

Med e spered n'eo ket bet chomet war an danvez dispaket dirazañ, kaen en-devoa an danvez-mañ beza koulz lared divent. Studi ar *Barddas* a zigor d'or spered dorjous an Divent heb Bevenn.

« Ar *Barddas*, eme Lemenig, a zo *Alhwez ar Vuhez* »

Lemenig, e diweza devezioù e vuhez, a oa o labourad war eul levrig hag a vije bet anvet *Gouiziegez ar Bed*.

Al levr-se, mar en-dije bet amzer digand Mestr ar Vuhez da gas anezañ da vad, penn-da-benn, a vije bet, e gwirionezh, unan euz ar haerra a gement a hell an den kroui, dre uhelder ar mennoziou e oa da zisplega ennañ.

Amañ war-lerh e roin eun delienn dioutañ a zell ouz pezh a zo anvet “ether“ ha n'ez eus bet kavet c'hoaz gand den eun displeg reiz anezañ, abaoe ma'z eo bet ar bed.

Abaoe eun nebeud bloaveziou, ar Ouziegez, war bez a zell ar bennoberezh (“radio-activité“), he-deus greet kavadennoù souezuz ha kaer meurbed.

An hini na gred ket c'hoaz en peurbadelezh ar spered, kaer en-deus chom estlammet dirag kaerder ar havadennoù-mañ, ne zeu dezañ sklêrijenn ebed ouspenn war vuhez an eneou er bed all, pe 'n eur stumm-lavaroud all, war vuhez peurbaduz ar spered.

An hini a gred en peurbadelezh ar spered a glask an tu da unani on Danvezelezh hag ar Speredelezh. Gweloud a ra, e meur a zegouez, bannerezh (“rayonnement“) sacherezh (“attraction“), bannoberezh, testennoù euz eur vuhez kuzet hag a zo e-barz an danvez kaled.

Disklêriadenn Lemenig a daol bannoù lugernuz el luziadenn-mañ, hag a zo gouest marteze da sklêrijenni an unaniezh a zo dre oll er bed, etre an danvez kaled hag ar Spered, beteg rei da gredi, zoken, ez eo greet an danvez kaled gand Spered en em wasket stard, ha netra ken.

AR BED

Pellenn-heol, pellenn-douar, pellenn-loar ha pellennou-stered, war neun en eur mor divent, n'o-deus na kreiz na bevenn. En tu-hont d'ar rannved kenta-ze, tro-war-dro, rannvedoù all gand pellennou-douar, pellennou-stered, pellennou-loar, pellennou-heol, war neun bepred en eur mor divent ha tano.

Pelloh c'hoaz, ha tro-war-dro, eun hevelezh mor ha war neun en e greiz, pellennou all : loariou, stered, heoliou ha douarou. Tro-war-dro bepred, strolladoù pellennou, hag heb ma'z a sell ar Spered pelloh, mui-ouzh mui e vez disklêriet dezañ strolladoù nevez ken ledan pep hini aneze hag ar strollad heoleg ez om-ni bremañ o veva en e greiz war on fellenn-douar.

Hag evel-se pelloh, ha tro-war-dro atao, heb diwez ebed, na bevenn ebed etreze, na korn ebed, ken ne reont en o unaniezh, nemed eur mor divent gand ar pellennou diniver war neun ennañ.

Dre-oll e verv ar vuhez. Disheñvel e pep pellenn, ha disheñvel c'hoaz er mor a anvom an *Neñv* ; eun hevelezh bervadenn a geflusk anezi dre-oll, hag a daol bannoù er mor divevenn, pe

an neñv, koulz hag er pellennou. Koulskoude n'ez eus tan all ebed da zerhel ar vervadenn-ze nemed ar *Spered* a vag anezi, dre m'ema ennañ tommder peb buhez. Dre-oll ema o tehel buhez ar bed, hag ar mor ema ar pellennou war neun en e greiz, pe an neñv – pa c'hoaz an *ether* – n'ez eo netra ken neemd eur MOR-SPERED.

Setu aze ar gavadenn dispar a dle miroud da virviken ano Lemenig diouz an Ankouez. War ar ger-ze e vezo, heb mar, savet, eun deiz da zond, eue gredenn nevez, eur ouiziegez, eur filozofiez. Dalhom !

Buhez ar pellennou a zo ivez enaouet gand ar sperejou a zo enne. Birvidig ez eo eta buhez ar Mor Spered, hogen gand muioh a halloud eged hini bleudennou an ether. An heveleb galloudou ez int koulskoude, hag o dastumadenn er bellenn – ha man all ken – a lak houmañ da veza kreñvoh eged eur vleudenn (*atome*).

Ar pellennou a zo eta war neun e-kreiz ar Mor-Spered. Kaset int en-dro gand an nerziou a zo enne oll hag a zo anvet ar bannerez hag ar zacherez. Ar re-mañ a lak pep hini aneze da droka bannou a vuhez gand ar re all ha gand ar Mor-Spered. Hogen bale a reont a-dreuz ar Mor-Spered ; en eur drei, pep hini warni heh-unan, eh heuliont eun hent hag zo deze o-unan.

Evel ma'z int stag ouz eur strollad pellennou, eh heuliont, ouspenn, an hent a heuill ar strollad-se, en e bez, a-dreuz ar Mor-Spered. Ar strollad-se, stag ouz ar strolladou a zo en-dro dezañ, a ra kemend-all gante ; hag ar re-mañ a zo ivez kevrenn euz eur strollad brasoh hag a ra e dro, dre unaniez, gand ar Bed-Oll a zo kaset en-dro, en e bez, heb na chomfe ennañ eur vleudenn difiñv.

An hed a zo etre ar bellenn-heol, ar bellenn-douar hag ar pelennou stered, koulz hag etre o heñchou, a-dreuz ar Mor-Spered, ne gresk na ne wanna. Pep hini a vez dalhet en e leh, heb na sevel na koueza, na dizrei war eun tu pe war eun tu all, euz e hent. Ha koulskoude n'ez int douget gand netra, daoust deze beza behiou a bouez. Gand o labour o-unan ez int dalhet, ha netra ken. Dre unaniez o galloudou, bannerez ha sacherez, e chomont e-pign er Mor-Spered hag e valeont, heb harz na kammegiez. Sachet war eun tu gand sacherez eur bellenn bennag, sachet war eun tu all gand hini eun all, hag a ra kempouez d'an hini genta, pep hini he-deus da zenti c'hoaz, tro-war-dro, ouz sacherezou hag a zeu d'he haoud a-bell-pell bepred, ha dre ar Mor-Spered, evid ober kempouez an eil d'eben. Hag evel-se e vez dalhet didrubuill en e lodenn Mor-Spered.

An Neñv, pe ar Mor-Spered, n'hall ket beza gwelet ganim en e zanvez, rag an danvez-se a zo re dano evid on zellou. Ar re-mañ a dreuz an danvez-se heb hen gweloud, evel ma treuz or horv an êr, en-dro dim, heb gouzoud doare anezañ. An danvez-se n'ez eo eta nemed BLEUDENNOU SPERED...

... Krouer ar bed a zo SPERED. Eñ e-unan ha n'ez eo nemed Spered. Evid kroui ar bed, evel ma ra, heb diwez, nag ehan, n'en-deus nemed eur vammenn ma tennfe diouti ar Grouidigez. Ar vammen-ze ez eo EÑ-E-UNAN hepken. Dre-ze n'hall tenna dioutañ nemed Spered. Ha setu perag *kenta danvez ar bed, an hini a zo dre-oll, a zo spered ha netra ken...*

Maro Lemenig

War-dro deiz kenta ar bloaz 1910, Lemenig a reas ar goulenn evid kaoud e retred. N'halle ken stourm pelloh ouz e hoant da zistrei da Vreiz evid oberi e-touez ar bobl.

En sell e oa da vond da chom e-kichenn Brést hag ahane da vond da vale ar vro a-dreuz hag a-hed evid sklêrijenni, gand e brezegennou, Breiziz ar mêziou koulz ha ar hêriou.

Nag a levez a oa ennañ o soñjal e oa erru ar houlz evitañ da vale digabestr dre-oll, hervez e hoant.

Hogen en deziou kenta miz C'hwevrer, Lemenig en em gavas diêz. An droug a yeas dalhmad war wasaad. E galon dreist-oll a oa skoet, ar galon he-devoa karet Breiz, ar Vretoned

hag an oll Gelted gand kemend a dan, a nerz hag a zouster. Ar galon-mañ he-devoa bevet, nann eur vuhez hepken, diou pe deir buhez ne laran ket. N'halle ken harz ouz ar hleñved : re skuiz e oa.

Daou ezel aHorsedd Breiz, Kaledvoulc'h ha Tangwall, en em gave bemdez e-kichenn Lemenig e-pad an deziou diweza. Hogen Lemenig hag e zaou geneil a felle deze kaoud bepred fiziañs : Ober Lemenig n'halle ket echui evel-se.

Setu erru a Vrést eur helou mad : kavet ez eus – ha miret eo – eun ti evid Lemenig.

Siwaz ! ar mezeg ne leze ken esper. Med perag ne raje ket an Tad eur burzud ?

Erru ar 15 a viz Meurz, ar hlañvour a chomas war e wele, taget gand eun derzienn ha na dorre ken, na noz na deiz. E spered a oa en eur vervadenn estlammuz. Biskoaz ar spered kaer-mañ n'en-devoa roet eun testeni ken braz euz e nerz hag euz e gaerder. O ! pebez galloud ! Amañ, e oa Lemenig war leur an argad. O ! pebez blenier ! O ! pebez drailler tud ! Arzur war e varh, Kaledvoulc'h, e gleze en e zorn, hag an Tangwall war e lerh.

Greet evel-henn ! greet evel-se ! Stourmet amañ ! brezel ! Treh da Vreiz !

E-pad eiz deiz ne baouezas ket e spered da vond a-dreuz hag a-hed dre Vreiz-Izel ha dre an oll vroioù keltieg. An Ober braz a oa krog ! Ar Bed a oa o vond da grena war e ahel. Erru 'oa an eur evid ar Gelted. Erru e oa *Ren ar spered* !

Penaoz soñjal e oa an den-mañ dirag Falz an Ankou ! Biskoaz e spered ne oa bet ken ledan, ken gallouduz.

Mar doa gwir eh erruje hebdale eur an disparti euz ar horv marvel hag ar spered birvidig, e welem sklêr-mad n'houlle ket hemañ na mervel nag en em zistaga diouz spered e ziskibien. Nann, spered Lemenig ne stristaas ket eur vunutenn beteg ar vunutenn diweza. Spered Lemenig a zo beo hag a vezo ganim da virviken.

An 21 a viz Meurz, Lemenig a zavas diwar e wele hag ar mezeg hen kavas kalz gwelloh. Ra vezo meulet an Tad ! Ha setu-ni da veuli e ano santel. Greet en-devoa eta ar burzud a houlennem !

An noz a dremenas sioulloh. Hogen da bemp eur euz ar beure, e-pad e gousk, korv Lemenig en em zistagas diouz e spered. Ar horv koazet a hwite pa oa ar spered en e gaerra splannder.

Lemenig a zo bet douaret e bered Menez Merzer, e Pariz, e bez e dad-kaer, da hortoz distrei e relegou doujet da zouar Breiz venniget pa vezo sonet an eur da embann e hloar e pevar avel ar Vro.

Breiziz, Keumroiz, Kerneviz, Alabaniz, Iwerzoniz, Kelted ar Bed-Oll, mirit an eñvor euz an 22 a viz Meurz 1910 !

Kan bale soudarded Lemenig

Setu Lemenig Meur o sevel euz e vez :

Savet eo ar Brenn !

Son 'ta, son, va Horn-Boud, war lein Menez Are

Da zihuni va Gouenn !

War ribl ar Ster Elorn e kerz ar Brenn brudet :

Savit ho penn, breudeur !

Enebourien or Gouenn 'zo krenuz ha spontet :

Setu Lemenig Meur !

Ar Brenn e varo gwenn a gerz 'eneb ar Gall

Pignet war gein e varh.

Sko 'ta, va hleze, sko ! Torr eskern ar re fall :
Dalh 'ta, Kaledvoulc'h, dalh.

Ar Brenn a ya d'an treh hag a gerz e Bro-Hall.
A-raog, Bretoned !
Ar hêriou 'zo losket, krog-mad eo an Tangwall :
Diwall doh Gallaoued.

Eur youhadenn skiltruz 'zihun ar Vretoned
En tu all euz ar mor,
Deffro y mae y dydd ! Ye deffro gwyr Gwened,
Powys ha Dynefor.

Ha war-lerh ar Brenn Meur e komzom-ni, Kelted,
O youhal : Diwall doh !
Krenit, tud didalvez, krenit, poblou ar bed !
Setu an Draig goch !

Paul Diverres (Tangwall)

Teirnez¹⁰ Breiz

An dizurz a ren peb broad,
Levier ebed evid leviad ;
An arne o krozal dre-oll ;
Brezel 'tre ar mestrou diroll.

Marheien, mevelien mestrou
Bremañ diskoazell d'an Ankou.
Spered roman maro en Breiz :
Eur c'hoant hepken, hepken eur feiz.

Lemenig 'zo savet raktal,
Arouez ar Hrouer war e dal,
E dal, melezour spered fur,
Hag en e zorn kleze Arzur.

Deuz kalon Breiz, bro an dero,
Eo deut Lemenig gwenn-baro.
Evel eur paour eo tremenet
E-touez an dud dall ha dallet.

Anavezoud 'ra pep hini ;
A-dost, a-bell e oar barni.
Diskenn a ray 'neb 'zo uhel,
Sevel a ray 'nebd 'zi izel.

¹⁰ Teirnez : ? Marteze "taernez" = taeroni (?)

Diwez an noz, Goulou-deiz, ru' :
Deiz an emgann braz 'zo erru.
Gwad 'zo en oabl, gwad 'zo en dour,
Gwad war gleze an argadour.

Rag ar hleze stok ouz an neñv,
An dremmwel skubet a vreh kreñv.
Enebourien, berniou war vern,
Kig d'ar brini, d'ar chas eskern.

Tan ha maged, listri war vor,
E beg ar wern banniel Arvor.
An treh 'vo da vordeidi Breiz ;
Kig estren d'ar pesked da breiz.

War zouar, na menez, na ster
Evid harz ouz ar Brenin taer.
Dre-oll an Treh ! Erru an eur,
Strolladou Breiziz d'ar Gêr-Veur !

Strolladou-kad dindan an Arh :
Brenin Lemenig, war e varh ;
Dindan arh bali vraz Pariz,
Lemenig en penn ar Vreiziz.

Ar barz Marzin adtuhunet,
Korn-boud Arzur e-neus sonet,
Sonet a galon virvidig,
En enor ar Brenn Leminig.

Gand youl vadelezuz an Tad,
Eo treh Lemenig en argad.
Teirnez Breiz da Virviken !
Da Ouenn ar Gelted gourheskenn¹¹.

Erwan Berthou
(Kaledvoulc'h).

¹¹ gourheskenn : ?